

**Camille Le Mercier D’Erm : Les Bardes Poètes nationaux de la Bretagne armoricaine.** Bet embannet e 1919.

(Barzonegou e brezoneg. N’eo ket bet lakaet an oll re ; re hir e vefe al labour). An oll varzenrgou-ze a zo “nasionalist“. Advoulla ‘reom anezo e-keñver studi an Istor.

### **Taolenn**

**Kanaouenn ar Vretoned (Brizeux)** (An Oriant 1803 –Montpellier 1858).

**Furnez Breiz** (Brizeux).

**Er puar brér** - (Jean-Marie Le Joubioux –An Arh 1806 – Gwened 1888).

**Telen en Arvor.** (Jean-Marie Le Joubioux –An Arh 1806 – Gwened 1888).

**Karanté er Vretoned doh ou Bro.** (Jean-Marie Le Joubioux –An Arh 1806 – Gwened 1888).

**Da varzed Kemri** Prosper Proux –Poullaouen 1811 – Montroulez 1873).

**Breiz** Jean-Marie Le Jean (1820 – 1876)

**Barzed Arvor.** Jean-Marie Le Jean (1820 – 1876)

**Eur ger a-raog.** *François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)*

**Eun amzer a zo bet.** François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)

**Yez koz on zadou.** François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)

**Yez Vreiz.** François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)

**Yez koz on zadou.** . François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)  
**Yez Vreiz.** François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)  
**Ar brezoneg.** François-Marie Luzel (1821 – 1895) (Fañch an Uhel)  
**Salud Plougastelliz** (Anne-Marie Ropars (Bolazeg 1839 – Karnoed 1913)  
**Dihun Breiz** (Anne-Marie Ropars (Bolazeg 1839 – Karnoed 1913)  
**Gousperou an anaon** (Narcisse Quellien –(Ar Roh-Derrien 1848 – Pariz 1902)  
**Ar glazig.** Brélivet Joseph. (Lokorn 1849 – Pariz 1918)  
**Maro ar roue Morvan** (Charles Gwennou – (Lezardreo 1851 – Vitry-sur-Seine 1915)  
**Ar Breton** (Emile Ernault Sant-Breg 1852 – Sant Brieg 1938).  
**Breiz da virviken.** (Jos Parker Fouenant 1853 - Fouenant 1906)  
**Gwerz Breiz-Izel** (Adrien de Carné Brest 1854 – Bourg-la-Reine 1943)  
**Hun ar Barz** (Yves Le Gall – Sant-Servez-Duaod 1860– Sant-Servez-Duaod 1922)  
**Keltia ‘vo da viken !** (Frañsez Vallée – Plounevez-Moedeg 1860 - Sant-Laorañs Roazon 1949)  
**On ene hag o zelenn.** (Frañsez Vallée – Plounevez-Moedeg 1860 - Sant-Laorañs Roazon 1949)  
**Kan a vrezel :** (Per Pronost) Treflez 1861 – Brest 1909)  
**E skol va farrez. :** (Per Pronost) Treflez 1861 – Brest 1909)  
**An dever.** (Yvez Berthou – Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933)

**An hini goz. .** (Yvez Berthou – Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933)

**Broad sklaved ! .** (Yvez Berthou – Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933)

**Evid skeudenn Nominoe.** (Yvez Berthou – Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933)

**Gwerz war stad ar brezoneg.** (Toussaint Le Garrec. Kergrist-Moelou 1862 – Montroulez 1939).

**Dalh Iwerzon Eñvor.** (Toussaint Le Garrec. Kergrist-Moelou 1862 – Montroulez 1939).

**Keltia ‘vo da viken !** (Picquenard : Charles de Keranbars – Kemper 1872 – Forest-Fouenant 1940)

**Emgann Alre** (Yves Quérou – Plougonver 1873 – Plougonver 1956)

**Gwazoniez an Duk Arzur III** (Léon Le Berre – An Erge-Vihan – 1874 – Roazon 1946).

**Va gouenn** (Léon Le Berre – An Erge-Vihan – 1874 – Roazon 1946).

**Gwir Vretoned.** Paotr Treoure (Augustin Konk. Plougin 1874 – Kastell-Paol 1952)  
Abad.

**Ar bugel hag ar Barz** (Claude Marie Le Prat. Brest 1875 – Vern-d’Anjou 1926)

**Hirvoudou ar Barz.** (Claude Marie Le Prat. Brest 1875 – Vern-d’Anjou 1926)

**War zav.** (Claude Marie Le Prat. Brest 1875 – Vern-d’Anjou 1926)

**Ano ar barz** (Claude Marie Le Prat. Brest 1875 – Vern-d’Anjou 1926)

*Da heul ez eus barzonegou e gwenedeg. N'int ket bet adskrivet :*

**Ar saü Gwenediz** Lavaus ; Le Maréchal Moustouer-Logunec'h 1878 – Pleuvigner 1945)

**Ema er “simbol“ get er person.** Lavaus ; Le Maréchal Moustouer-Logunec'h 1878 – Pleuvigner 1945)

**Dalham ataü d'er goh vod.** Lavaus ; Le Maréchal Moustouer-Logunec'h 1878 – Pleuvigner 1945).

**Mouez eun delenn.** (Auguste Bocher – Duod 1878 – Servez Kallag - 1944)

**Ano ar barz .** (Auguste Bocher – Duod 1878 – Servez Kallag - 1944)

**Bebet ar Varzed .** (Auguste Bocher – Duod 1878 – Servez Kallag - 1944)

**Me a zo Breizad !** (Auguste Bocher – Duod 1878 – Servez Kallag - 1944)

**Damb arnehe** (Loeiz Herrieu – Henrio). Kaodan 1879 – An Alre 1953)

**Bro goz ma zadou** (François Jaffrennou – Taldir. Selled ouz Taldir e-barz “Embann an Hirwaz“.

**Zao Breiz-Izel** (François Jaffrennou – Taldir. Selled ouz Taldir e-barz “Embann an Hirwaz“.

**Dalh soñj O ! Breiz-Izel** Taldir. Selled ouz Taldir e-barz “Embann an Hirwaz“.

**Kleze dir ar Vretoned.** Taldir. Selled ouz Taldir e-barz “Embann an Hirwaz“.

**Kan ar mênhir.** Taldir. Selled ouz Taldir e-barz “Embann an Hirwaz“.

**Ya, me 'gano.** Amédée Cozic (Tregonev 1880 – La Haute Chevauchée 1915).

**Kan-bale Soudarded Lemenig.** Paol Diverès (An Oriant – 1880 – Aberwe (Kembre) 1946)

**Beh d'ar Gallaou** (Laouig Le Moal – Koadoud 1875 – Crouy 1918)

**Avel ar mêz.** (Cuillandre Joseph. Molenez 1880 – Roazon 1955)

**War zao.** (Cuillandre Joseph. Molenez 1880 – Roazon 1955)

**Moueziou tramor :** (Cuillandre Joseph. Molenez 1880 – Roazon 1955)

**Glahar er barh** (Jean-Marie Jacob. Lokmariakaer 1882 - Luzenac 1938)

**Nominoe, tad ar vro.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**An amzer 'hall tremen. .** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Kentoh mervel !.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Yez ar Gelted.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Youlou ar Vreiziz.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Beiziz penn-kil ha troad.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**O ! Banniel Breiz !** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Kan brezel.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Da Vro-Hall.** (Georges Le Rumeur. Foujera 1882 – Azay-Le-Rideau 1942)

**Pa vin maro.** Ronan de Kéméné – Duchauchix. 1882 Laurenan – Hautecombe 1957)

**Boéh er gwir Vretoned.** Job en Drouz-vor – Larboulette Joseph-Marie - Plihineg 1884 – Henbont 1958).

**Nevenoe .** (Yvon Crocq – Poullan 1885 – Brest 1930).

**Er glaù.** (Pierre Mocaer. Pariz 1887 – Brest 1961)

**Salud da verzerien Vreiz.** (Hippolyte Laterre – Karaez 1887 – Pariz ? 1918)

**Salud da Vreiz-Izel. .** (Hippolyte Laterre – Karaez 1887 – Pariz ? 1918)

**Galvedigez** (François Le Du, -(Kalanel 1888 – Plougernevel 1960)

**Dihunam !** (Bleimor – Jean-Pierre Calloc’h – Kallloc’h – Ene Groez 1888 –Urvillers 1917)

**Huñeer.** (Bleimor – Jean-Pierre Calloc’h – Kallloc’h – Ene Groez 1888 –Urvillers 1917).

**Breiz Dishual.** (Camille Le Mercier d’Erm.)

**Hun ar barz.** (Francis Gourvil – Montroulez 1889 – Villeneuve-Saint-Georges – 1984).

**Ar vuhez o honid.** (Jos Le Bras – An Dre-Nevez 1889 – Bar-Le-Duc 1915).

**Dihun ar Vretoned.** (Louis-Napoléon Le Roux – Planiel 1890 – Londrez 1944)

**O ! Breiz-Izel, O ! Mamm zantel .** (Filomena Cadoret – Bonen 1892 - Rostrenn 1923).

**Enor da Vreiz ! (Jean Guichard – Ploueg-Pontreo 1894 - 1934)**

.

*Kanaouenn ar Vretoned*

War don : An hini goz.

Diskan

Ni 'zo bepred  
Bretoned,  
Bretoned, tud kaled.

1

O ya ! d'ar brezel paotred taer,  
Paotred vad ha seven er gêr.  
Ni 'zo bepred  
Bretoned,  
Bretoned, tud kaled.

2

Tehel a ra Zaoz penn-da-benn,  
Pa leverom-ni : » Torr e benn ! »

3

Hogen, klevit en eureudou  
Kanaouenn skiltr ar biniou.

4

O Breiz-Izel ! o ! kaerra bro !  
Koad en he hreiz, mor en he zro !

5

Allaz ! mar delean Breiz kuitaad,  
Me 'welo leiz ma daoulagad ;

6

Mirit, breudeur gêz, ho penn-baz,  
Ho pleo hir, ho pragou braz ;

7

Gourennit mad ! Eur gourenner  
En-deus kalon ar merhed kaer.

8

Me 'droho ma zeod em beg  
Kent dizeski ar brezoneg.

## Furnez Breiz

Skrigna 'ra bleizi Breiz-Izel  
O kleved embann ar berzel.

Tehed a ra Zaoz penn-da-benn  
Pa leverom-ni : « Torr e benn ! »

Evel eru barr grizill er mor  
Ar Zaozon a steuz en Arvor.

N'am-eus ket aon rag ar Hallaoued.  
Kreiz eo va halon, va dir lemmet.

Beza Gallaoued pezh a garo,  
Me ne derhan ket rag ar maro,

Mar varvom evel 'ma dleet  
D'ar Gristenien, d'ar Vretoned,

Morse ne varvim re abred.

**(Brizeux)**

**Jean-Marie Le Joubioux-** An Arh 1806 – Gwened 1888) Skrivet e gwenedeg e-barz al leor. Sed amañ ar skrid-se.

### **Er puar brér**

*(Skrivet en eun doare gwenedeg, bet ijinet gand an oberour. Setu perag eo bet adskrivet evel m'ema e-barz al leor orin)*

*Pe laket e' er puar brér prezeg a Vreih Hani Leon, hani San-Bro, hani Kerne, hani Guéned)*

Er memb tad an devoé ganet,  
Er memb mam en devoe mâghet  
Job, Ivon, Guillou ha Iahan,  
Tud dispartiet a vihan.  
Kiottad a brezant ty ou zad  
Eit moned de glah chance vad,  
Ind a lavaras : Kenavo,  
Kenavo, bréder, guélamb bro !  
Dah er huh-heol é hs Vonik,  
Doh er saù-heol é has Jobik,

Er hreiz-nouz Guillou a yas tré,  
Ha Iahan a yas er ghis-cé  
Ou bro, Breih-Izel, étre-z-hé.  
En dud nezé ne œnt ket stank ;  
Er vro oé de bep-unan frank.  
Deusto ne oent ket mui kevret,  
Er puar brér oé haval meurbet :  
Memb predek tostik, memb dillad,  
Er memb bleâu, er memb deulagad ;  
Ker pennnek unan èl en al,  
Mad d'er re vad, tèr d'er ré fal.

Chomein a brezant pèl-amzer,  
Peb-unan d'é du, en e ghér.  
Ind a ziske d'ou bugale  
Labourat dour ha mêlein Doue,  
Mervel kentoh eit gobér fal,  
Pléghein er pèn idan er goal,  
Ha kâsaat mui eit kakaouèd

Er ré d'ou ghir ne zalhe ket.

Chetu, un dé, ag er Vro Gal  
Ur voéh a saù : El er ré-ral,  
Ni a vén ma komzo Bréhis !  
Konz Brehonek zo ur fal ghis.  
E leh bragheu bras, ni a vène,  
Ma vou touzet ehué ou fén ! »

Er puar brér hag ou bugale  
Nezé hum gonzas étre-z-hé :  
« Qa houdé pegoyrs, Bretounéd,  
E ma hur mistr er Galeuèd ?  
Pautred, ha sentien a remb-ni  
Da dud péré n'en deus bili  
Nag ar hur konz ? Dalhamb attaù,  
En despréd dehé, d'her ghizieu  
En dés lausket d'emb hun Tadeu !  
E Brehonek hun nès pedet,

Ha Doué en des hur chelenet ;  
E Brehonek hun nès konzet,  
Biskoah d'hur ghir n'hun ès manke.  
Kendalhamb perhuéh hur ghizieu,

A houde, er puar brér, peb plé,  
Ar ur blacen hum zastumé,  
Hag a douie é vehent bet  
D'ou Doué, d'ou Bro, Léal prepet.  
*(Doué ha mem Bro)*

**Jean-Marie Le Joubioux-** An Arh 1806 – Gwened 1888) Skrivet e gwenedeg e-barz al leor. Sed amañ ar skrid-se.

## **Telenn en Arvor**

Arvor aghént bro er Barzed,  
Allas ! mui n’hi doé Bara erbet !  
En estik, d’en amzér nehué,  
Peb plé, ér hoédou a gane.  
- A ! kan attàù, kan, douc aestik,  
- Er Barzéd mui ne sonnand grik !

Da galan-gouyan<sup>1</sup>, en audeu  
A hudé ghet en houelenneu.  
-Sco er herrêg, sco, môr, attàù ;  
E voéh mui Barz erbet ne sàu !  
Beta bremen, mem Broïk beur,  
Sonnein a ré te delen eur.

---

<sup>1</sup> Da galan-gouyan : d’an Oll-Zent.

Tud fal en dés taulet ér mor,  
A dameu, telenn en Arvor,  
Ha degaset ou dés un al,  
Un delen pri ag er Vro Gal.  
T zillad dû, mem Bro, kémer ;  
Ar-n-ous deit-é er goal amzér !  
Merwel a ra er Brehonek,  
Allas ! lahet der ar Gallek !

Un dén yaouank<sup>2</sup> a dremeiné,  
Hag é galon lan a dreisté,  
A dremeiné étal ar mor,  
En eur ouilein ar é Arvor...  
Kavein a ra (na péh boneur !)  
Telen Arvor, en delen eur.  
Eit séhein hun dareu, un Ael  
A dennas ag en houlenneu,  
Hi groas abéh ghet hé zameu.

---

<sup>2</sup>Un dén yaouank : Brizeux.

-Dén yaouank, petra a hrey-te  
Ghet da delenn, ha garanté ?-  
E galon ghet joé a feutas,  
Ag é galon e keméras,  
Hag ou stagas ar en delen.

Sonnein a ra : *Ni vo prepet*

*Prepet Bretonned, tud kalet !*

- En dassonno a rescond : Prepet,
- Prepet e vehemb Bretonned ! –
- Sonnein a ra : *Er Brehonek,*
- *Attaù, mem Bro, vo te bredek !*
- -e Tro-ha-tro ur voéh vras a sâù :
- Er Brehonek attaù, attaù ! –
- Ean a son : *Dreist en ol vadeu,*
- *Ka^ramb er Hrist, Doué hun Tadeu !*
- - Ur voéh a saù, èl boéh er mor :
- Er Hrist attâù, Doué en Arvor !
- (*Doué ha mem Bro*).

-

**Jean-Marie Le Joubioux-** An Arh 1806 – Gwened 1888) Skrivet e gwenedeg e-barz al leor. Sed amañ ar skrid-se.

## **Karanté er Vretoned doh ou Bro**

War don : En hani Gous.

### **Diskan**

Me halon zo  
Ged mem Bro ;  
Oh ! ya, prepet e vo !

**1**

Hag e vehen é pén er bed,  
Doh Breih me halon vo staghet.

**2**

En heol, m'er gouér, a huel broïeu,  
El leh m'en dés mui a vadeu.

3

E Paris é huélan treu bràu,  
Treu kaer d'em deulagad attàu.

4

Me zo bet é mesk er Sauzen :  
Etal d'hai é omb paorien.

5

Rom hag er Pab e mès guélet,  
Ha Breih ne mès ket ankoéhet.

6

Er briue-zé, deusto ker kaer,  
Prepet me halon oé ér ghér ;

7

Mem diskouarn a hoanté konzeu

A lar d'em e Breih hur mammeu ;

8

Mem deulagad a glaské lann,  
Kelen glas ha bleun ar belann ;

9

Ne huélen ket mui er bragheu  
En dés miret d'emb hun tadeu ;

10

Ne gleuen mui er binieu  
Nag er Barz ghet é guerzenneu.

11

Het me dremeinei mem buhé  
E Breih é chommein, mar vén Doué.

12

Me vén bihuein é ty me zad :  
Ino hembkin é on erhat ;

13

Me vén choukein idan er gué  
En dés ean bet skedet ehué ;

14

Me vén trezein er morik dous  
En dés trezet e vaghik kouz ;

15

Dreist pep tra me vén pedein Doué  
Ghet-n-oh, broiséd, lan a fé ;

16

Me vén èl oh, ar mén deulin,  
Er vin èd eit me zud pedein ;

17

Ghet-n-oh me larei pedenneu  
En un ilis dû dré vlaïeu.<sup>3</sup>

18

Me vén e Breih bout béiet<sup>4</sup>  
Hag etal me mamm beur lakaet.

### **Diskan**

Me halon zo  
Ghet mem Bro ;  
Oh ! ya, prepet e vo !  
*(Doué ha mem Bro) Paris, en Imbril 1838.*

---

<sup>3</sup> Ghet-n-oh me larei pedenneu  
En un ilis dû dré vlaïeu. : Ganeoh me laro pedennou, En eun iliz du dre vloaveziou.

<sup>4</sup> béiet : beziet.

**Prosper Proux** (Poullaouen 1811 – Montroulez 1873)

**Da varzed Kemri**

Ra vezit deut mad, Kenvreudeur,  
Barzed helavar a Vreiz Veur,  
Pa hoh-eus prizet treuzi ar mor  
'Vid starda dorn breudeur Arvor !

Stignet kerdenn ho telennoù  
Da gana dem kanaouennoù,  
Kanaouennoù kaer ar Varzed  
Savet en amzer dremenet.

Lavaret dem hirio penaoz,  
Penaoz, siwaz ! eme oajou koz,  
Eo c'hoarvezet an disparti  
Etre or breudeur ger ha ni.

Kanit diwar-benn an Drouized,

En o dorn ar falz alaouret,  
O baro hir, o zaeou gwenn,  
O prezeg war lein an daolvên.

Kanit ar Bobl nerzuz meurbed,  
An dud gallouduz 'deus bernet  
Ar herreg pounner bern-war-vern,  
Evid bezia o fenntiern.

O-deus savet taoliou, peuliou,  
Sonn goude kalz a gantvedou,  
Sonn, hag o lavared bepred =  
« Bro Vreiz-Izel ne varvo ket ! »

Kanit ivez a vouez uhel  
An emgann ruz hag ar brezel,  
Ar Roue taer, ar Roue gwir,  
Arzur hag e gleze meur dir.

Prigent war e varh glaz, sternet,  
Pa 'n em strinke ken kounnaret  
E-kreiz stroll an enebourien  
Hag o flastre evel merien.

Kanit Riwal an diouganer,  
Riwal ar Barz hag ar goaper,  
War eur skubelenn a-haoliad  
O nijal war-zu ar Zabat ;

En-rdo dezañ stroll an diaoulou  
O yudal euzuz er mêziou ;  
Ar horred du war an dorgenn,  
Pennfollet gand an abadenn ;

An ourhed-vor<sup>5</sup> o soroha,  
Ar vor-gezeg o hourina,  
War grib eonuz ar gwagennou

---

<sup>5</sup> An ourhed-vor : ar mor-hoh.

Pa ziroll stourm ha kurunou ;  
Ar vorveh koant, ken dreistourez,  
Hanter-besk hag hanter-vaouez,  
O kana flour d'ar verdeidi  
Da lakaad brevi o listri.

Kanit Bro an Hiberni glaz,  
Bro ar Verzerien, ar Zeent vraz,  
Eflamm, Ronan, Ke ha Sane,  
Sent leun a feiz, a garante',

A zsikennas en Breiz-Izel  
'Vid prezeg dem an Aviel,  
A zavas war gern ar peulvên  
Kroaziou skeudennuz Mab-an-Den,

Hag on deskas da azeuli  
Ar Mab ganet er marchosi,  
Ni, tud direiz n'on-doa biskoaz

Stouet or penn dirag nep groaz.

Tridal a ra or halonou  
O kleved yez or gourdadou,  
Hag an delenn o seni c'houeg  
En douar santel Sant-Brieg.

Setu va dorn, Kenvroidi,  
Ha teir youhadenn 'vid Kemri !  
Ya, daoust d'an amzer, daoust d'ar mor,  
Breur 'vo Kemro da vab Arvor.

**Notenn gand Embann an Hirwaz :** *Meur a varzoneg 'zo el leor gand Kervarker. N'int ket bet adskrivet amañ pa vez tu da lenn anezo e-barz ar **Barzaz Breiz**, a zo tu da brena c'hoaz.*

**Jean-Marie Le Jean (1820 – 1876) Eostig Koad an Noz.**

### **Breiz**

Kentoh mervel eged en em vastari !

« Daoubleget war ma fennbaz evel eur baourez dall,  
E oan o vond gand en hent, marheduz<sup>6</sup> braz ha fall,  
Hag e lavaren sioulig, daelou em daoulagad :  
-« Doue !... me 'zo eun dilez evel eun emzivad.

Deizioù kaer, peleh oh-hu ? Pemeh oh-hu, yehed ?  
Bugale garantezuz, ar greñva euz ar bed,  
Emgannou, stourmou trouzuz, kened ha madou braz,  
Eet oh oll gand an avel !... Eun dismantr on, siwaz !

---

<sup>6</sup> marheduz : nehet.

A-wechou en em reudan dindan ma flanedenn,  
Ha kerkend all e welan berniou enebourien  
War gein dragon ruz Marzin, savet ganto e dorn,  
Ha ker spontuz da weloud hag an tan en eur forn.

Neuze e ran ar maro hag e savan goude ;

Gouliet, nann mastaret, e kerzan adarre ;  
Godue ar glao ar sehour, goude ar bed an neñv,  
Rag ar Feiz hag an enor ganin-me a zo kreñv.

Mar deo truezuz ma stad, evid meuz n'e' ket,  
Rag mar don bet diskaret, flastret ha diwisket,  
Eo bet stenn ma gwazied ha tomm d'an enebour !  
Nikun euz ma gouenn galed n'eo bet morse treitour.

E desped d'an oll galon, d'an nerz braz ha dispar,  
Gand an amzer on bountet en hent du ar glahar ;

Ne don-me ken, siwaz din ! nemed eur vogedenn  
Kaset du-mañ ha du-hont, evel eur goumoulenn.

Koulskoude, pa zellan mad, e welan c'hoaz ar mor  
O tond eun eur grozmola beteg treuzou ma dor :  
Kerreg braz ha dero koz a zo bepred em hreiz...

- Gwrah koz, en em frealzit : ho ano a zo *Breiz* ! »

« Ya, ma Doue benniget ! en desped d'am hozni,  
Pa glevan lavaroud : *Breiz* ! ma gwad a oar bervi ;  
N'on ket maro c'hoaz eta ; ma bugale nehet  
O-devoa greet, e Kemper, eur bez din re abred ;

Ma yez a zo beo ivez e genou ar Vreiziz,  
En desped da valloziou an dud nay hag iskiz ;  
Pa varvo ar yez kaer-ze, kaled 'vel an direnn ;  
Mad eo da hourhemenni ha mad da frealzi,  
Kuñv ha treñk eo pa gerer, n'ez eus ket evelti.

A-viskoaz em-eus ar vrud da gaoud eur penn kaled !  
Ma gizioù koz a garan ha n'o dilezin ket ;  
Ar Brezoneg hag ar Feiz ganin-me a chomo  
Keit ha ma vo mor em zro, em hreiz mein ha dero.

Stourmet em-eus aliez, morse n'on bet trehet ;  
Taoliou dorn ha taoliou baz am-eus bet ha roet ;  
Hogen Kezar ar maher a oa eru hwezadenn :  
Skubet on-eus e roudou ; ni 'zoñj d'ar Hrist hepken.

Dorn Doue a zo warnon hag a vo da viken ;  
Ma herreg ha ma aotchou a vezo atao gwenn ;  
Kaer en-devezo c'hweza avel an iverniou,  
Doue, ar Feiz, ar Frankiz, o-do or halonou.

Dre ma youl eh on staget : tavom war gement-se...  
Mar deo kaled ma douar, me zo kaled ive' !  
Eñvor ma sked tremenet a vo atao em fenn,  
Ha dezañ em-eus miret eru hleze, eun delenn. »

*(Gwengamp, miz Ebrel 1867)*

ma youl : *notenn en galleg el leor orin* : Cette affirmation, singulière, chère à l'amour de certains Bretons, n'est nullement conforme à la vérité historique. On sait que la Bretagne ne renonça à son indépendance que contrainte et forcée. « Après la défaite de Saint-Aubin-du-Cormier, en 1488 – dit très justement un de nos historiens nationaux,- la Bretagne se trouvait dans l'alternative d'une extermination ou de son union à la France » (Pitre-Chevalier : La Bretagne Ancienne et Moderne, p. 533).

## **Barzed Arvor**

*D'an Aotrou Charlez a Vro-Hall  
Barz breizad e Pariz*

**Notenn e galleg el leor orin** :L'érudit celtisant Charles de Gaule qui n'est pas né Breton, mais qui sentait couler dans ses veines la vieux sang des Celtes, mérite assurément ses lettres de grande naturalisation pour avoir, - exemple rare !- appris le breton, par amour pour notre Pays, et fait, avec nos représentants, des démarches, d'ailleurs infructueuses, auprès du gouvernement français, pour obtenir l'enseignement du breton en Bretagne.

Citons, de Charles de Gaule, un excellent ouvrage : Les Celtes au XIXème siècle ... Appel aux représentants actuels de la Race Celtique avec préface, notes et une étude de Jean Le Fustec sur Le Réveil de la race, Paris1908.

Ar Gonideg, sav da benn  
Ha bez hirio laouen !...

Sutal a ra an avel skiltruz er gwez uhel,

Krozmola a ra ar mor den-dro da Vreiz-Izel,  
Hag al lodennig dall, gand diouaskell grohen,  
A nij kreñv ha kamm-digamm a-raog pao ar gaouenn.

An deliou, war ar yeot glaz, a ruill strobinellet,  
Evel eur bagad teuziou a bep tu dastumet,  
Hag ar bleizi, o yudal , a daol gand an hekleo  
Eun dourni hag a rafe d'an oll sevel o bleo !

Ar sterig ; en eur glemm en he gwele meineg,  
A ya da gas he dour sklêr d'ar mor braz islonket ;  
An deñvalijenn a drid war gern ar herreg sonn,  
A yourh, e-touez ar strouez, en em guz gand spouren.

Ha peger kaer eo an deiz, pegen teñval an noz !  
Ma Doue, c'hwi 'ra traou kaer, ha ganeoh ma bennoz !  
Gand daoulagad mad on dall... Hogen setu al loar  
O tond da sklêrijenna bugale an douar !

Salud dit, loar arhanteg, rouanez vraz an noz,  
Sav da benn war Menez Bre, sav a-uz Koad-an-Noz ;  
Sav eta, sav uhelloh, dalh da zevel bepred,  
Ma hello an oll Varzed ‘n em gaoud amañ kevred.

Taliesin ha Marzin, Gwenhlan, diouganer braz,  
Brizux, Gizhouarn, Karis, c’hwi ‘zo maro, siwaz !  
Degasit ho telennoù e harp troad an dervenn  
El leh ma vezo ar stroll, klok, didrouz ha kempenn.

Tavit mik, evel rag-eost<sup>7</sup>, ha c’hwi, sterig klemmuz !  
It d’ho toull, bleizi naonieg, teñvalijenn spontuz !  
Hentchou fankeg ha mein-ruill, gouvezit degemer  
Mad-oberour or mamm-yez, ar Barz, or Penn-Sturier.  
Diwallit da ober droug d’an hini ‘zo goude,  
Anvet Yann-Willou Herri, hennez eo “Barz Kerne“ ;  
Diwallit da zivera<sup>8</sup>, c’hwi, koumoulenn du-bran,

---

<sup>7</sup> rag-eost : diskar-amzer.

Penn-Sturier : notenn e galleg el leor orin : Il s’agit probablement du Vème La Villemarqué.

<sup>8</sup> da zivera : da zevera.

‘Vid ma hellint azeza war ar gador douskan.

Sant Kaourantin ha Sant Paol, ha c’hwi, Roue Grallon,  
Degasit, war bouez e zorn, amañ “Barz Bro-Leon“ ;  
Roit eun inkane wenn d’an Aotrou Lezeeuk,  
Ha ganti c’hoaz ho pennoz, pa vo e droad er stleug.

Sant Padarn, sant Meldeok, Justok ha Gobrien,  
Dougit war eur hravaz-vrug unan ho peleien,  
Va Aotrou er Joubiou, eskob a Itali,  
Hag e teuio “bara Gwened“ ha ken êz ha pep hini.

Aotrou Person Sant Laorañs, Kemar, den kaloneg,  
Hastit, en ano Doue, deut amañ da brezeg ;  
Ho Patron hoh ambrougo gand e hrill goz velget :  
Evel ma viot gwelet, e vint anavezet.

Tostait, suteller-noz, grut eur sutelladenn,  
Ha c’hwi sperejou Awen, grit peb eur youhadenn,

Ken a greno an douar, da embann d'ar Varzed  
Hasta buan dond amañ !... it zoken d'o herhed.

Mad ! setu-int oll erru ganeoh eun taol krenn ;  
Me a wel an Aotrou Kl'ec'h "Barz koz ar Rungolvenn",  
Gourhant, person Gwiseni, Kersal, "Barz Plouneour",  
Ha Milin, "Barz Plouzeniel", paotred hag a gan flour.  
Sell, "Barz Kastllfidardo", Kere, beleg e Brest,  
Sell c'hoaz Perrot "Barz Taole", da gana atao prest ;  
Sell Gwegen, "Barz Sant-Ujen", Kastrek "Barz Brenniliz"  
Stangenet, "Barz Tregourez", oll kanerien diskuiz.

Hastit dond, Aotrou Roudaot, c'hwi a zo dilerhet,  
Moarvad e yoah adarre o vale er vered ;  
E-touez beziou an Anaon, ar Feiz a zo gwall-greñv,  
Ha setu hoh anvet mad "Barz Bali euz an Neñv".

Bremañ p'ema o starda kerdin aour e delenn  
Barz pe "Eostig Koad-an-Noz", d'ho lakaad oll laouen,

Deut ivez, Barzed ar bed, o kleved e vouez voan,  
Rag boulhet mad eo an noz ; deredit ‘ta buan.

Deredit, Koronal ker, “Barz ar Vugaligou“,  
Troud, ar peoh ker kuñv bremañ ha taer en emgann ;  
Taolet hoh-eus ho kleze da gemer eur bluenn  
Da skriva e brezoneg *Skwer ar Grsitenien*.

Azezit war gein ar golm, Milin, “Laouenan Breiz“,  
Hastit dond, gand An Uhel, ar Barz c’houeg, en or hreiz ;  
Ha c’hwi, Kaourintin Thomas, anvet “Barz an Tour-tan“ !...  
Mall braz eo warnom an oll da glevet c’hoaz ho kan.

Itron Varia Rumengol, Mamm vad ar Vretoned,  
Degasit deom, me ho ped, ho Parz muia-karet<sup>9</sup> ;  
E vouez, ker leun ha ken drant, a feralzo an oll,  
Pa lavaro na lezit den ebed d’en em goll.  
Ha te, floh ar Strobinel, pe welloh “Roh-al-Laz“,

---

<sup>9</sup> ho Parz muia-karet : Jean-Pierre-Marie Le Scourr.

Degas deom ivez Rannou, Breizad stard a-viskoaz.  
Gante *Laouenidigez da oll Varzed ar Vro*  
Koulskoude hag ar *Hlahar-Gan*, savet a-nevez zo.

Na peleh out-te, Mindu, ki lemm “Barz Gwerliskin“ ?  
Peleh ema Prosper Proux, da vestr drant ha lirzin ?  
Kerz da lavared dezañ ema ar Varzed all  
Strollet e-kreiz Koad-an-Noz, ouz e hortoz raktal.

Galvit gand ho sutell aour, Gradlon, ho Parz Fave,  
Hag e Plounevez-Kintin, e hlevo mad ive’,  
Eur hloareg a gar e Vro : sevel a ray e benn,  
Hag an daou Varz a zeuio, skañv o zroad ha laouen.

‘Vel ma paouez an Eostig da gana e werz koant,  
E tosta “Barz Sant Laorañs“, hag eñ ken sioul ha drant,  
Da dal’ ar gador douskan, hag e sav ar Sturier  
Da zegemered gantañ Barzed nevez Treger :

Ann Hegard “Barz Ploueg“, “Barz Kavan“ ar Habeg,  
Gwionvarc’h, ha c’hoaz Ar Gall, tud lemm ha speredeg,  
A gan eur zon da hoarzin pe *Kantik Sant Erwan*,  
Hag a lenn troidigez deoh oll ha meurbed glan.

Kerkent an Aotrou Vannier, “Barz deol Sant Heñvel“,  
A zispleg en e iliz, pep sul, an *Aviel*,  
A gan gwerz e zant Patron hag he han ker kompez  
Ma laka er halonou dudi ha levenez.

Ken a ro d’an oll Varzed ar Penn-Sturier eur sell :  
« Trugarez deoh, emezañ, c’hwi a gar Breiz-Izel  
Hag he yez, evel Brizeux, Durand, Gwillou, Lukaz,  
A zo er gwele-douar, kousket ennañ, siwaz ;Ò

« N’ouzoh ket c’hoaz marteze da betra oh galvet.  
Da droad an dervenn goz ‘mañ ? Klevit eta, Barzed,  
Eur helou espar meurbed, eur helou souezuz....  
Na grenit ket koulskoude, n’e’ ket eun dra spontuz :

« Eun Aotrou oh a Bariz, Charlez Vro-Hall anvet,  
Den gouezieg ha kaloneg, en-deus eur werz savet  
En or yez, desket gantañ dre garantez d'or Bro !  
Breiziz, greom on dlead : meulom oll e ano !

« Goulennom digand Doue ma vo heuliet e skwer,  
Ma raio kalz eveltañ eur or henvroiz ker,  
Hag eun deiz, ar Brezoneg, enoret gand an oll,  
A chomo en or Bro gêz heb mond biken da goll !

Bremañ eta, Kenvreudeur, leverom, en eur vouez,  
E kanom da Varz Pariz, da dremen e enkrez,  
Or halonou, or bennoz ! Ma vezo feralzet,  
Pa na hell dond d'ar Vro-mañ a garfe kalz gweled ».

Hag evel an alhweder, pa zav a-denn-askell  
A-uz d'he neizig kuzet e gwiniz Breiz-Izel,  
E sav pedenn ar Varzed, hag oll, en eur dridal,

E leveront : « Ra vevo pell Charlez a Vro-Hall ! »

Eun deiz war-lerh, da zav-heol, e-harp troad an dervenn,  
E oa ar gador douskan ha warni eun delenn.  
Telenn an hini a gar kana a-hed an noz,  
D'an neb a ya d'e gleved, gwerziou, e *Koad-an-Noz*.

1864.

**François-Marie Luzel (1821 – 1895)**

*Au lieu de s'entretuer, fraternellement au nez des Franks et des Saxons ébahis :  
e 1753, pa oe emgann Sant-kast :*

Re Vreiz-Izel 'deus breudeur pell,,  
Biskoaz eterze n'eus brezel :  
Keid ma vo roh en lez ar mor,  
'N em garo Erin hag Armor !

En brezoneg ha nann en gall'  
A gomze on tadou gwechall.  
En brezone kanom-ni c'hoaz  
Or brezeliou, or feiz er Groaz.

Ya, da viken, ni 'divenno  
Or feiz, or ent, on ilizo',  
Bremañ an deiz, evel gwechall,  
'Eneb Zaoz, koulz hag eneb Gall !

## **Eur ger a-raog**

Oll Vreizaded a hrouienn<sup>10</sup> vad,  
Klevet eur ger, tud Vreiz-Izel :  
-Ra chomo peb unan Breizad,  
Dre oll, bepred, beteg mervel !

Broiz, bezet 'velho tadou`  
Eeun ha gwirion en pep tachenn ;  
Lqaket enor 'raog ar madou,  
It en peb leh uhel ho penn.

Dalhet mad d'ho kiziou gwechall,  
D'ho kwerziou koz ha d'ho soniou ;  
Hogen na desket ket re Hall !...  
Pedet, dañset er pardonioù.

Ha c'hwi oll, ar re<sup>11</sup> doug pluenn,

---

<sup>10</sup> a hrouienn : a ouenn.

Tud a skiant ha tud gouizieg,  
Nankounahit ket ez oh mibien  
D'ar re 'gomze ar brezoneg.

Ha ne glevet-c'hwi ket lared  
On yez, ar gosa, marteze,  
A zo er bed, on yez karet,  
A dle mervel ?... N' glevet ket se ?

Nebaon 'ta, oll baotred vad Breiz,  
Gorreit-c'hwi bremañ ho penn,  
Ha komzet ha skrivet gand feiz  
Ar yez koz na varvo biken.

Euz ar vro bell ma sav an heol  
Eo deut ganim 'barz ar vro-mañ,  
Ha mibien Vreiz 'dle he homz oll,  
Keit ma skeudo an heol amañ ! (*Bepred Breizad*)

---

<sup>11</sup> : pere, el leor orin.

## Eun amzer a zo bet

1

Eun amzer a zo bet, ha ne vije klevet  
On-touez nemed yez Vreiz : war ar mêz ‘vel en kêr,  
Oll ‘komzent ar yez koz gand on zadou komzet.  
En Gwened, en Kernev, Leon ha Landreger.

Eun amzer a zo bet, ‘oam gwisket ‘n eur hiz all ;  
Pep hini ‘n-doa tok-braz, bragou braz ha chupenn.  
Ha ne oam ket heñvel, ‘barz en Breiz, euz re Hall,  
ha ne oa ket touzet on bleo-hir war on fenn.

Eun amzer a zo bet,, ‘weljeh on ilizou,  
En kêr ‘vel war ar mêz, leun a dud daoulinet,  
Bep sul ha beb gouel-berz neuze, er pardonious,  
Ne vije ket dañset a-raog beza pedet.

Eun amzer a zo bet, ‘vije klevet en Breiz,

En hentchou, el lanneg ha war lein ar menez,  
A bep tu, da guz-heol, war-dro an abardaez,  
Kanañ ar gwerziou koz hag ar soniou nevez.

Eun amzer a zo bet,, soudarded Vreiz-Izel  
‘Oa doujet en peb leh, hag ar Zaoz milliget  
A dehe diraze, pe e ranke mervel,  
Rag re Vreiz ha re Zaoz biskoaz n’int ‘n em garet.

Eun amzer a zo bet, ne gareim ket a-grenn,  
Gweled tud divroet, re Zaoz pe re Vro-Hall,  
(Rag ni, a beb amzer, ‘zo bet kaled on fenn),  
O tond da werza dim eur yez hag eur feiz all.

Eun amzer a zo bet,, hag ez oa eun enor  
Beza ganet en Breiz, beza anvet Breizad,  
Hag e veze laret : « Paotred vad an Armor ! »,  
Ha kement-se ‘oa gwir !... Hennez ‘oa ‘n amzer vad !

Peleh ‘ma ‘n amzer-ze ? Peleh ema, siwaz !  
 Ha ni ‘dle beza oll Zaozon pe Gallaoued ?  
 N’eus ket Vreizaded ‘barz en Breiz-Izel c’hoaz  
 Ni ar vibien hena, marteze, euz ar bed ?

Marv ez e’ eta *Armor* ?... Nann, ar paotr koz ‘n hen goar,  
 Karget e izili a liammou houarn,  
 ‘Zo astennet e gorr bremañ war an douar,  
 Euz he diwall *Yann Zaoz* ha *Gallig al Louarn*.<sup>12</sup>

Tro-dro, kornandoned louz ha fall a-vagad  
 A lamm, a dañs, a lar : »Marv ez e’ ar paour *Armor* !  
 Setu hen diskaret ! O ! ya, marv ez e’, marv mad !  
 Marv eo ! marv eo ! marv eo ! Taolom e gorr er mor ! »

Piou a gomz er giz-se ?... Paotred Zaoz ha re Hall !  
 -Nann ! nann ! n’en-de’ ket marv, med kousket eun tammig ;

---

<sup>12</sup> Yann Zaoz ha Gallig al Louarn. : Notenn el leor orin :L’Anglais et le Français.

Kanet, kanet izel ! M'hen gwelfeh o fiñval  
E viz bihan hepken, gand spont e varvfeh mik.

Diwallet ! diwallet ! N'hoh-eus-c'hwi ket gwelet  
Kleze braz ar Gwesklen<sup>13</sup>, ar paotr lad er brezel,  
E zorn dehou warnezañ ? M'hen lar c'hoaz : diwallet !

Mar dishuñv, ar paotr mad, (ober rey marteze),  
Neuze ho-pezo keuz, neuze 'vo eun dañs all !

---

<sup>13</sup> Gwesklen : notenn e galleg el leor orin : on ne s'attendait guère à voir Bertrand Du Guesclin paraître ici en défenseur de la nationalité bretonne. Sed amañ an notenn-ze : On sait, dit La villmarqué dasn les notes qui suivent ce poème (An Alarc'h), qu'en 1379 (comme précédemment en 1364, lors de la bataille d'Auray), »Gwuelin fit, lui, Breton, cause commune avec les ennemis de la liberté bretonne et commanda l'expédition dirigée contre sa Patrie par le Roi France Charles V qui l'avait fait Connétable et comblé d'honneurs. Mais Guesclin ne recueillit pas le fruit de son dévouement à la France. Vaincu en tenant tête à son Pays, il se vit soupçonné par Charles V d'infidélité : juste châtement d'une félonie trop réelle qui fit exclure son image de la salle des Etats de Bretagne.

Zaozon, c'hwi hen goar mad, eo pounner e gleze,  
Ha, c'hwi, na hoarzfet ken er giz-se, paotred Gall.

Neuze 'vezo klevet : « You ! you ! dir en avel !  
El lanneg, er menez, war-zav, war-zav dre-oll !  
Arzur 'gerzo ganeom, paotred vad Breiz-Izelç  
Arzur, Doue ouspenn, kerzom, n'hellom ket koll ! »

*(Bepred Breizad)*

*Plouillo, miz Eost 1863)*

## **Yez koz on zadou**

Piou 'lavar ez e' marv en Breiz  
Spered ar re goz hag o feiz,  
Hag e kollom on yez beb deiz ?

piou 'lavar 'vezo ar galleg  
A dreho war ar brezoneg,  
War an derv kaled an haleg ?

Beo-mad e' spered on zado'  
Ha keit hag ar bed e pado  
Rag mui hen karom 'vid mado'.

On gwerziou koz, ni o han c'hoaz  
Er menez, war aod ar mor glaz ;  
'Vel hirio, o hano warhoaz.

Keid ma vo brug en Breiz-Izel

Hag en aod ar mor glaz rehel,  
On yez koz na hell ket mervel.

Kaset skolaerien war ar mêz,  
En pep bourk, en pep tiegez,  
Evid ober brezel d'on yez ;

Kaer ho-pezo kas skolaerien ;  
Paotred Vreiz 'zo kaled o fenn,  
Ha n'o zelaoufont ket a-grenn.

Mar na drohet teod ar bugel,  
Kerkent ha ma teu da henel,  
'Vezo poan gollet ho prezel ;

Ha mar bez on beg alhwezet,  
Euz o beziou, en peb bered,  
Ar re goz o sevel 'welfet,

‘Vid deski d’on bugaligou  
Komz o yez, kana o gwerziou,  
Ha darempred ar pardonioù.

Lesuket tud Vreiz, paotred Vro-Hall,  
Leusket i, ne reont tra fall ;  
Troet o spered e leh all.

Lesuket ganeom on hoz-kiziou,  
On ilizou hag on hroaziou,  
Ha yez ar re ‘gousk ‘n o beziou.

On hontadellou, ‘tal an tan,  
Goude al labour hag ar boan,  
En-pad ar goañv, a-houde koan.

Leusket ganeom on beleien,  
‘Vid lared dim an overenn  
A glev peb-unan penn-da-benn.

Ar pardonious, pa deu an hañv,  
Leh ma'z aim oll, ha yah ha klañv,  
Da bedi, dañsal hag evañ.

Ar re yaouank d'ober al lez  
D'ar plahig koant, ar benherez,  
C'hoantaad d'hanter-tiegez.

M'hen tou, bugale Vreiz, biken,  
Ne rainy dizurz en neb tachenn,  
Ha na em glemfont ket a-grenn.

Hoge, lazañ on yez karet !  
'Vid se, tud fall, na refet ket,  
N'ho-pezo 'med amzer gollet.

'Vel ar hleun balan er parkou,  
En douar Breiz 'sav ilizou,

Kroaziou mên, soniou ha gwerziou !

Keit 'vo kerreg en aod ar mor,  
'Kano 'r barz koz war dreuz e zor  
Bepred en yez koz an Armor !

*(Bepred Breizad)*

## Yez Vreiz

Yez on tadou, yez venniget,  
A beb amzer komzet 'n on hreiz,  
A-vihanig 'm-eus da garet,  
Rag ten yez koz, eo buhez Vreiz !

Te 'm-eus karet hag a garan,  
Yez kaer on Zent, yez hlan on Feiz,  
War ar bed kelt ha ma vevin,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Te 'ro din yehed, pa vezan klañv,  
Te 'laka sklêr ha glan an deiz,  
Yez Taliesin haGwenc'hlan,  
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz !

Pa vez ma spered ankeniet  
Ha glahar em halon e-leiz,

Gand eur zonig ‘vezan diboaniet,  
Rag te, yez koz, e’ buhez Vreiz !

Er broiou pell, ma halonig,  
Evel ar wennili d’he neiz,  
A huana da yez Arvorig,  
Rag te, yez koz, e’ buhez Vreiz !

‘Vel ma tiwall ar mesaer  
E oanedigou oh ar bleiz,  
Breiziz, diwallom on yez kaer,  
Rag te, yez koz, e’ buhez Vreiz !

Gwasket out gand ar Hallaoued,  
‘Eneb ar gwir, ‘eneb ar reiz,  
Med dit eo ma halon bepred,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Gouzañvom pep tra, tud ma Bro,

Evom dour, debrom bara heiz,  
Med dalhom mad bet' ar maro,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Kanom on gwerziou, on zoniou,  
Stourmom ouz ar Gall a hwez preiz !  
Stourmom ! ha mirom on giziou...  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Gand eur werz koz ha sin-ar-groaz,  
Pa houlen ar paour kêz lojeiz,  
Hen degemerom gand joa vraz,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Ha ni, Barzed nevez Arvor,  
Ni hen tou oll dirag an deiz,  
Dirag an heol, dirag ar mor,  
-Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

« Ni ‘droho on ton teod en on beg »,  
-Kleo, Brizeux, da genvroiz keiz !-  
« Kent ‘vid dinah ar brezoneg »,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Me ’lavar hag a lavaro :  
Keid ‘lammo ma halon em hreiz,  
Yez ma zud-koz, me az karo,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

Ha, goude buhez ar bed-ma’,  
En eur Vreiz all, me am-eus feiz  
Da gomz brezoneg ‘vel ama’,  
Rag te, yez koz, eo buhez Vreiz !

## Ar brezoneg

Yez on tadou o ! yez karet,  
Yez ar Varzed kz a wechall,  
Mar eus bastarded, trubarded,  
Da dizanzao evid yez hall,

N'eus ket a forz, rag mastaret  
'Vez da gozni gand o feiz fall :  
Lez int da ober, da lared !  
O halon 'zo louz ha teñval.

An oll Vreizaded a ouenn vad,  
kaled o fenn ha tomm o gwad,  
Da harpo beteg ar maro ;

Rag te e' yez or Zent koz,  
A gomzont c'hoaz er Baradoz...  
te e' ar Frankiz hag ar vro !

**Anne-Marie Ropars (Bolzeg 1839 – Karnoed 1913)**

### **Salud Plougastelliz**

Breudeur om dre ar ouenn, breudeur dre ar galon,  
Ni ‘labouro bepred ‘vid mad ar Vro Vreton,  
‘Vid he Yez hag he feiz, he c’hoarvezo pep tra ;  
‘Vo ket kemeret Breiz ‘vid ar vro disterra.  
Gwaskt om, c’hwi hen goar, gand tud diavez bro ;  
Savom uhel on penn ! ‘N em stardom war eun dro !  
An treh a vo ganeom, ni ‘houl boud dishual.  
Spontom ket ‘raog on skeud, na ‘raog treitourien Hall !

### **Dihun Breiz**

Dihun ‘ta, Breiz-Izel, on Mamm muia-karet ;  
N’eo ket mad e chomfes re hir ken da gousked ;  
Galaret e vem oll mar dalhez, morgousket,  
Da huñvreal pelloh en amzer dremenet.

Fin ‘zo bremañ d’an noz, arru eo ar beure ;  
Me ‘wel ar sklêrijenn ‘para war ar mene’ ;  
An heol tomm ha skeduz a lugerno prestig :  
Zao eta, Breiz-Izel, selaou mouez ar Barzig.

Deuz peb brank e tiskenn eur han melodiuz,  
Douster ar mintinveziou rent ar galon joauz,  
Hag ar gliz-noz, kouezet war ar yeoten weñvet,  
A ra dezi sevel kaerroh en he hened.

Youhadennou skiltruz a glevan dre an êr  
O lared : « Breiz-Izel, arru eo an amzer ! »  
Ma vem oll unanet da zikour on Mamm-Vro,  
Da derri al liamm he chadenne pell zo.

Kerne, Treger, Leon ha paotred vad Gwened  
A zo war-zao bremañ, p’o-deus an drouz klevet  
‘Vo prestig goueliou braz war Vre hag en Pontreo

Da enori on Breiz, diston rei an hekleo.

Deut eta, ma Broiz, deut oll, deut da gleved  
Mouez ken drant ar Varzed a zo ho mignoned :  
Komz a refont ouzoh war galz demeuz a draou  
'Vid m' vo laket ar Gwir en peb leh treh d'ar Gaou.

Dihun 'a, Breiz-Izel ; lez da gousk hirvouduz,  
Kemer perz 'vid biken en da renk enoruz,  
Divenn gand lealded da yez, da gustumou,  
Goul frankiz d'ar vibien, gwasket gand ar mestrou.

Goul da yez, er skoliou, en-keñver ar galleg,  
Ha te 'vo, dreist ar Gall, 'n eur houd ar brezoneg ;  
Da spered 'zo digor, da benn a zo kaled,  
Na blegi ket dindan ar beh warnout taolet.

## Narcisse Quellien

### Gousperou an anaon

(*Lodenn*)

Eun nozvez a viz Gwnegolo,  
'Oa tan ha kurun en neñvo'

Eur gwall amzer, 'vel 'm-eus gwelet  
En aod Penmarh hag e Geoded,

Ken grene log<sup>14</sup> ar pesketaer  
Ha krene mui e wreg er gêr.

'Kreiz al luhed hag ar gurun,  
Pa oan-me krog em henta hun,

Eun huñvre, deut euz Breis-Izel,

---

<sup>14</sup> **log : lojenn.**

Diouganas ma Bro o vervel,

An Arvor dilezet a-grenn,  
'Vel ar fao brein 'ribl an aven.

Ostizez Vear, 'treuz he dor,  
A houlennas gnd ar hoador<sup>15</sup>,

Gand ar hoador o vond en kêr,  
Glaou en e garr leun o zeier ;

« Ma den mad, o redeg ar vro,  
Klevet ah-eus piou zo maro ?

Karrigell an Ankou, fenez,  
Zo tremenet a-dreñv d'ar hloz.

« N'eo ket a-dreñv d'ar hloz, maouez,

---

<sup>15</sup> hoador : hoader.

Na kennebeud dre an hent rez

Eo karr an Ankou tremenet,  
Dre an neñvou ne laran ket :

Dindan bolz an neñvou, fenez,  
'Oa trouz veur 'uz da Goad-an-Noz ;

An Ankou krignet war e har  
'Zo eet en-dro war du Bear,

Ha, goude Bear, dre ar vro,  
An Ankou en-deus greet e dro.

Brañsellet kloh an anaon,  
Ha 'kreiz peb iliz ar vaz-kaon,

Ar goulou krog ouz peb aoter,  
Heb beleg, kolist na soner.

War ar bed 'vo eur gwall diroll :  
Marteze Breiz 'zo 'vond da goll. »

Evel-se 'komze ar hoadour  
D'an ostizez o kerhad dour.

A bevar horn Arvor, neuze,  
'Oe war-zao, 'n eur ober eul le

(Sonet ar varn 'vid Breiz-Izel)  
Mond d'heh obidou kent mervel,

'Oe war-zao ar re 'oa Breiziz  
Evid mond da vez ar Gêr-Iz,

Pevar, ha Barzed o-fevar ;  
Unan euz Leon, den klouar,

An eil e Dreger, eur paotr sonn,  
Eun all a Gerne, tomm ‘vel tonn,

Hag eur paotr gouez euz a Wened :  
Pevar, ar re all Gallaoued.

Eun dra vurzuduz a vije  
Da weled ar pevar den-ze,

D’o gweled eno o-fevar,  
D’an hanternoz, e skeud al loar,

Dirag puñs Kêr-Iz, war an trêz,  
‘Kichenn kêrig Douarnenez ;

Ar mro ‘vid arched Breiz-Izel,  
‘Vid goulou ar stered uhel,

Hag evid beleg ‘oa Doue,

Ha kanerien ar Varzed-se.

Neuze, gand eur mordrouz bennag,  
'Oa damgwelet o tond eur vag ;

Ha, pa stokas d'an aod eno,  
Euz an tramor 'oa eur Himre<sup>16</sup>.

Ha c'hoaz burzuduz kalz muioh  
Da gleved o tiñsa eur hloh,  
Eur hlohig o tiñsa 'n eun tour,  
En touriou Kêr-Iz, 'kreiz an dour.

Ha, 'barz ar mor glebiet e zorn  
Ha greet sin ar Groaz, paotr 'n Elorn

'Groagas 'n eur glemmvan er giz koz,  
Mud ar mor ha sioul an noz :

---

<sup>16</sup> Himre : eur Hembread.

« Abaoe an êlez villiget  
Euz an neñv m'int bet diskaret.

Doue 'n-eus taolet o zelenn  
D'an dour, 'vid on hanerien.

Hag on zadou-koz evel-se,  
Pa oe dalhet o Bro oute,

Dindan ar goueliou war ar mor,  
'Treuz ar mor o tond en Arvor,

Ken klemmuz hag eun tonn 'kanent,  
ya, ha 'veulent Doue 'velkent.

Emgann aliez o-doe bet  
Ha mervel peb gwech ma' veze red :

A-raog mervel youh ar bleizi,

Evel an erer on Barzed-ni.

En on hozni ma om gwasket,  
Eostiged Breiz ne davfont ket.

Euz an dud vad ne vo eñvor  
Pa vo torret Telenn Arvor.

Ha piou ‘veilo Doue amañ  
Pa vo eet Breiz-Izel ahann , »

‘Pad *In Exitu* ar Vreiziz,  
E tiñse ar hloh e Kêr-Iz.

« Nann, ma breudeur, eme eun dall,  
N’eo ket Arvor eet d’ar bed all ;

Ha mad ‘ve lared ar *Credo*  
Or-boe desket gand on zado’.

Doeu da genta, Brezi goude,  
Gand feiz, fiziañs ha karante’.

Ken gwir hag an heol lugernuz,  
Doue ha Breiz a zo paduz ;

Keid ‘vo war an aod eun daolvên,  
Hag e tiwano eun dervenn,

An dero ‘barz ar hoajou braz,  
Ar brug e lanneg, hag ar Groaz,

Keid ‘vo eru Groaz-hent en he zao  
Hag uhel war hleun er parko’

Kei ‘traillo war ar mor an avel,  
Biken ne varvo Breiz-Izel ! »

## Ar glazig<sup>17</sup>

1

Deut Glazig, da gleved eur zon,  
Ar brava sur e peb feson ;  
Hag euz gwiskamant on tadou,  
Koefou dantelez or mammou  
Emaon da lavared eur ger,  
Eur ger ivez euz or Bro gaer,  
Euz Bro benniget an Arvor,  
A bep tu glebiet gand ar mor.

Diskan

O dalhom mad d'or bragou-braz,  
D'on tok ledan, d'or chupenn hlaz !  
En on dorn ar penn-baz dero,

---

<sup>17</sup> **Ar glazig** : notenn e-barz al leor orin : C'est le nom qu'on donne ar chupenn bleu des hommes de Quimper, Locrona, etc... et par extension à ceux qui portent ce vêtement, riche et seyant.

Ni ‘zo prest da zivenn or Bro.

2

N’eus den na hell ankounac’haad  
Ar Glazig ‘zo euz eur ouenn vad :  
War e dal ema ar frankiz,  
En e lagad an onestiz ;  
Kaloneg eo evid e Vro,  
Kaloneg beteg ar maro !  
War ar stourmleh, doudard dispar,  
Ha war ar mor, ‘n-eus ket e bar.

3

Ha, ma teufe an estrañjour,  
Euz ar zao-heol an enebour,  
Ma teufe drougeur ar brezel  
D’on hourdrouza e Breiz-Izel,  
Euz kreiz ar maged hag an tan,  
E vefe klevet on diskan :

Kentoh d'ar Glazig torr e benn !  
Or Bro zakr n'ho-pezo biken !

*(D'an 31 a viz Eost 1919)*

## **Maro ar roue Morvan**

*(Lodenn)*

Trehet Breiz ! El leurgann ne gleved, gwech hag all,  
Nemed eun den o klemm, eur marh o c'houirinal,  
Ha, pa zavas al loar, ne weled tro-war-dro  
Nemed brini e-leiz war ar horvou maro,  
Nemed dour an Elle o kas war-zu ar mor  
Gwad tud Vro-Hall mesket gand gwad tud an Arvor !  
Breiz-Izel, skuill daerou !... Hirvoud, Rouanezig !  
Setu maro Morvan !... Lavar d'az taou vabig  
Ez eo kouezet, a-hont, da bried hag o zad,  
Evel eur gwir Roue, evel eur gwir Vreizad,  
Heb biskoaz enebour na welas e zeuliou !...  
Desk d'az taou vab, pa blijo gand an Neñv,  
Prest da zivenn o Bro hag on Herminig wenn...  
Red eo ma vint o-diou glan ha gwerh da viken !

\*

En o hastell, a-hont ; tost d'ho mamm intañvez,  
Daou vab Morvan-ar-Meur a greñva beb devez  
Ha, beb devez ivez, en o halon dener,  
E kresk ar gasoni eneb *an Deboner*,  
Eneb Bro-Hall, eneb oll enebourien Vreiz...  
Kalon o zad, a-bez, eo a lamm en o hreiz !  
Gand a daou vugel-ze gra fouge, Breiz-Izel :  
Daou vab gwir da Vorvan int !... Er henta brezel,  
E weli ez int c'hoaz a ouenn on tadou-koz...  
Fiziañs enne, va Breiz ! Ro deze, da hortoz  
An devez ma vo red mond d'ar gann adarre,  
Da vennoz, da oll zoñj ha da oll garante' !...

Dindan galloud Bro-Hall, Breiz Vihan, pell amzer  
A chomas daou-bleget !... Re yaouank, re zister,  
E oa c'hoaz bugale ar Roue braz Morvan  
Evid he zenna krenn a zujidi, a boan...  
Mez, eun deiz, e klevjont o halon o tridal  
Gand hast da vond, d'o zro, da stourm eneb Bro-Hall.

« Poent eo, a lavaras d'e vreur, Nevenoe,  
Diskouez da Garl-ar-Moal ez eus c'hoaz eur Roue  
O ren ar Vretoned, ha n'en-deus spont ebed  
O vond da stourm outañ, hag ouz e zoudarded !... »  
Ha setu an daou vreur o vond war-zu Bro-Hall,  
War o lerh Breiziz oll, o banniel o nijal,  
Banniel an Herminig, ledan ha lugernuz,  
Ha gwenn evel an erh dindan an heol skeduz !  
O vond da stourm, Breiziz a gane en eur vouez  
Barzoneg kaer Morvan, e kleve alie.  
Kana c'hoaz en or Bro, war ar mêz hag e kêt :  
*Barzoneg Stourm Lez-Breiz*, er stum-ze hen anver !  
Meulodi da Lez Breiz ! Gloar, enor daviken !  
Eun devez goañv, a-hont, e weled en draoñienn,  
Anvet Traoñienn Ballon, eur stourm a hoarvezas,  
Hag, en deiz-se, d'he zro, va Breiz a hounezas !

## Ar Breton

Setu aze eur fall a loen !  
Pa vez gromet en em zivenn.

D'e oll grouadurien, Doue 'ro peadra  
Da zivenn o buhez diouz o enebourien ;  
Rag eur brezel a vez atao 'barz ar bed-ma' :  
N'eus nemed an Ankou a lak ar peuh da ren.

Ar bleiz en-deus bet nerz, al louarn finesa,  
An trav eur gwall gerniou, an êr eur biniou yen ;  
An den e spered lemm, treh d'al loen ar hreñva,  
Hag ar wreg he hened, treh da spered an den.

Na te, pobl ar Vreiziz,, petra 'teus d'em ziwall  
Eneb ar re a glask, goude gourennou hir,  
Da stlepel, maro-mik, 'mesk traou 'oz beo gwechall ?

Da youl ? Hi 'ra chom stard, 'vel er hoad dero yenn dir,

Da yez kaer en da benn, ez kalon da feiz wir.  
Dalh mad, hag e padi : An neb a venn a hall !  
(*Gwerziou Barz –ar-Gouel*)

## Breiz da virviken

Int 'lavar e varvez, va Breiz, o ! kaerra Bro,  
Spered an amzer goz a zo ivez maro,  
Hag on barzaz laouen, en eur guza e benn,  
A zo nijet en neñv, evel eur goulmig wenn.

Pa blego an dervenn dindan breh an haleg,  
An hudur-ze 'vo gwir ; peseurt tra kaloneg !  
Barzed, divennom 'ta, euz goueled or hoajou,  
On Herminig gwennoh eged 'n oll liliennou.

Ya, ker pell en or Breiz e vo Breiziaded,  
Dero er hoajou, er menez mein kaled,  
ha keid evid pedi 'chomo daoulin ganeom,  
Karantez or Bro gêz a vo bepred ennom !

Disprizom ar Varzed kañvuz hag o zelenn,  
Ha lavarom, breudeur, beo atao Kanaouenn !

Int n'anavezont ket ar hwezadenn Doue  
A zo 'barz or halon kerkolz hag on ene.

o ! Breiz, rag or mouez na vezo didalvez,  
E-pad pell amzer c'hoaz bezit leun a vuhez ;  
Mamm-Goz, ho pleo hir n'emaint ket c'hoaz re wenn :  
Bevit c'hoaz hir amzer, bevit da virviken !

## Gwerz Breiz-Izel

Va Breiz-Izel, va Mamm vuia-garet,  
Da viken ra vezi meulet !  
Da garantez 'ra 'z ay don oh don  
Ennom e goueled or halon !  
Breiziz ! chomom atao en or Breiz ;  
Dalhom he spered nerzuz en or hreiz !

Bro vrudet-braz, Bro ma klever enni  
Ar hleier santel o seni,  
Mor o trouzal, hag, a-dreuz d'ar hoad uhel,  
Mouez kreñv an avel o sevel,  
Douar a garom, Douar leun a vennoz,  
Te 'zo evidom korn ar Baradoz.  
(*Breiz karet*).

## Hun ar Braz

E-kreiz ma hun, eru wech e oe,  
Me 'oa da noz war ar mene',  
War Mene'-Du, a gave din,  
Hag an noz didrouz ha sklinton.

Ha gand ar menez, em hichenn,  
E tremene tud a-vandenn ;  
A-rumm da rumm, war ar mene',  
Tud an Arvor a dremene.

Gand o falz aour hag o zae wenn,  
An Drouized 'oa 'barz ar penn ;  
Ha 'barz ar penn 'oa Drouized,  
Ha kevred gante 'oa Barzed.

Hag an telennou a zone,  
Ar Varzed gante a gane :

« Tan, dir ha tan ! tan, dir ha gwad !  
Paotred Arvor, argad ! argad ! »

Diarhen, eur zae reun gantañ,  
Eur Beleg ‘oa goude ‘r re-mañ.  
‘N e gerhenn, Kroaz Zalver ar bed ;  
Ouz e heul ivez ‘oa Barzed.

Hag an telennoù a zone,  
Ar Varzed gante a gane :  
« Stouom on fennou d’an douar  
Dirag Doue braz ar Halvar ! »

Setu, war-lerh tud a vrezel,  
Marheien urzet Breiz-Izel,  
A-benn da benn hatnezet mad,  
Beb a groaz ruz war o dillad.

Ha trouz vraz gante o tremen

Ken a dregerne ar zaonenn ;  
Barzed gante o vond en hent,  
Ha Beleien ‘n o diagent.

Hag an telennou a zone,  
Ar Varzed gante a gane :  
« An Aotrou Doue ‘hourhemenn !  
Da vro Zav-Heol deom d’he divenn ! »

Pa oa ar re-mañ tremenet,  
E welis ar re Unanet ;  
Na Barz, na Beleg heul ane’,  
’Med Kergourtez er penn gante,

‘Med Kergourtez, eur gwir Vreton !  
Hag oll a gane a-galon :  
« Evid ar Vro, evdi ar Fe’,  
A-raog ! a-raog ! paotred Kerne ! »

Ar Chouanted avad, goude,  
A welis o tremen ive',  
Ha gante tudjantil ar Vro,  
Tud dispouron rag ar maro.

Gwillou Arvern, gante kevred,  
A gane, 'zsikane bepred :  
« Pe beza lahet, pe lazañ,  
Lazañ avad eo ar gwellañ ! »

Kriz ha kaled 'vije neuze,  
War Menez-Du, neb na ouelje  
O weled eun dall o tremen,  
Gantañ d'e gas 'med e gi gwenn,

O kleved o kana eun dall  
Kanaouennou an amzer fall :  
« Lahet ar Hont, gwasket an dud,  
An dud paour evel loened mud ! »

Ha ker klemmuz e oa e zon  
Ken e hantere ma halon...  
Pa dremenas, gand kezeg braz,  
Koz Gallaoued, gwisket en glaz,

Pa dremenas koz Gallaoued,  
Gand o hezeg o vond d'ar red,  
Ken 'dues diskaret ar paour kêz  
'Barz mesk ar vein, 'bazz mesk an drez.

Ha ken en-deus strinket e wad  
Den d'e zikour, 'med e gi mad,  
'Med e gi mad a hirvoude,  
Hag ar paour koz a lavare :

« Aotrou Doue, ma zikouret,  
Lahet on gand ar Hallaoued ! »  
Hag ar Hallaoued a hoarze  
Hag o vond kuit a lavare :

« Mad zo greet dit-te, truillenneg,  
Torr-penn gand da goz brezoneg ! »  
Hag eñ kuiy, ha d'an daou-lamm ru',  
Ken a strinke 'r mein en daou du.

Ha me o weled eun Itron  
O toned diwar-du Nizon :  
Hag ar apour koz en-deus savet  
Hag en he harr 'deus eñ laket.

Ha d'ar red, neuze, ha d'ar gêr,  
Ha d'ar red 'terzeg ar maner ;  
Laket ar paour 'n eur gwele mad,  
Gand lien gwenn sehet e wad.

Hag a-benn eun teir zun goude,  
Ar paour-kêz dall a oa pare,  
Hag adarre en-deus kanet

Gwerziou an amzer dremenet.

Hag an Itron a zelaoue,  
He mab bihan ive' a ree',  
Hag o-daou o-deus bet desket  
Gwerziou an amzer dremenet,

Gwerziou an amzer dremenet,  
Kanaouennou ar Vretoned...  
Hag ar mab, gantañ eun delenn,  
En-deus leusket eur youhadenn,

Eur youhadenn en-deus leusket  
Ken en-deus distonet ar bed,  
Distonet oll douar ha mor,  
Gand kanaouennou an Arvor !

Bet droug gand an neb a garo,  
Ar brezoneg n'eo ket maro,

A-drugarez an Itron ger  
Hag an Aotrou a Germarker.  
(1894)

## **Keltia 'vo da viken**

En amzer goz, eur wall-avel,  
O c'hweza 'n o goueliou,  
Pell diouz douar kuñv o havell  
'Aragasas on tadou.  
En daou du d'ar mor don,  
Daoust m'e' rannet on gouenn,  
Ni a gano a-grezi kalon :  
Keltia 'vo da viken !

Ar Zaoz, ar Gall 'deus on gwasket  
Krisoh 'vid an harlu ;  
Plega on fenn on-deus ranket  
Gwall-dizet a bep tu,  
Nerz ar Fallagriez  
Kaer 'deus bezañ dibrenn,  
Na dorr ket ar Halvedigez :  
Keltia 'vo da viken !

Doeu an Neñv ‘n-eus he hrouet  
Da voud eur « Mor a gan » ;  
‘Vid on daouarn boud chadennet,  
Ni ‘gano heb ehan !  
« Ar gwir eneb d’ar bed »  
Setu on reolenn !  
Hag, evel ar Gwir didrehet,  
Keltia ‘vo da viken !

Bremañ skoulmom, hervez ar hiz  
Euz on tadou, gwechall,  
P’en em gavom ‘tre kenvroiz,  
Heb ganim Zaoz na Gll,  
Kudenn ar Garantez,  
Ha youhom a-bouez penn,  
Ma tasono bolz an êlez :  
Keltia ‘vo da viken !

## **On ene hag o zeleenn**

Breh dir kaled  
Ar Vretoned  
'Blegas gwechall  
Ar Normaned,  
Ar Hallaoued,  
Ar Zaozon fall.

An divroad  
'Daole e droad  
War on mêziu,  
Ruzie e wad  
Al lann, ar hoad,  
Ar mêziou.

O Breiz-Izel !  
Daouar santel,  
O kaerra bro !

‘Vid da zevel  
‘Fell din mervel  
Ivez d’am zro.

Brava gizioù !  
Koanta soniou ,  
Sklitin o son !  
Gwiskamañchou,  
Yez va zadou,  
Yez ar galon !

Me ho miro,  
M’ho tivenno,  
Ouz an estren ;  
C’hwi a zavo,  
C’hwi a vevo  
Da virviken.

## Kan a vrezel

### 1

War-raog, Bretoned, ‘vid or yez hag or feiz !  
Bazad d’an enebour a daol e droas e Breiz !

### 2

Gouenn an dud nerzuz hag a galon,  
    Biskoaz n’out bet eet war da giz.  
Daoust ha dond a rafes da gaoud aon ?  
    Ne garez mui ‘ta da frankiz ?  
Ar gwad a red a-dreuz da hwazied,  
    Daoust ha n’en-defe mui tommder ?  
Da zorn ne ve mui ken pounner,  
Ma kren dirag an haillevodded ?

Petra ! tud fall leun a warizi,  
    A-du gand on enebourien,  
E Breiz-Izel a deufe mistri,

A rafe deom al lezenn ?  
Kentoh eged divenn o Bro  
Ha reded d'an tan evelto  
E ve jugellet evel loened ?

Taolom er-mêz euz a Vreiz-Izel  
An den difeiz hag an divroad,  
En or Bro na lezom ket sevel  
Bugel ebed euz eur seurt gwad !  
E Leon, d'ar moh ne roer ket gwiniz,  
Na jistr, e Kerne, d'ar bleizi !  
D'o bro ni ray dezo distrei.  
Breiz-Izel, oll, a zo da Vreiziz !

\*

War-raog, Bretoned, 'vid or yez hag or feiz !  
Bazad d'an enebour a daol e droad e Breiz !  
(*Annaig, Lili ha Roz-Gouez*)

## **E skol va farrez**

A-boan me 'oa ken uhel ha botez eun archer,  
Ma'z oan kaset d'ar skol evid deski galleg,  
Rag deuz ar yez-se c'hoaz ne ouien ket eur seurt ger,  
Ne ouien, evel va mamm, nemed ar brezoneg.

M'ho-pije va gwelet, diskabell ha diarhen,  
Oh en em gaoud er skol, oll ho-pije c'hoarzet ;  
Va genou, digor-braz, e peb leh e sellen,  
Gand em fenn daoulagad ur bugelig dianket.

Renket oh eur voger, evel ar zoudarded,  
Tro-war-dro d'an ti-skol, me 'wele taolennou  
Warno livet e du pep seurt anevaled,  
Gand an Aotrou skolaer, anvet lizerennou.

Med ne jomis ket pell eur hrouadurig gouez ;  
Soñjezonou nevez a deuas buan em spered ;

An anevaled du, kentoh hag eiz devez,  
A oa deuet da veza va brasa mignoned.

Ma vijen bet ken fur ha m'oan mad da zeski,  
N'me-bijet ket skubet an ti-skol d'ar pardaez,  
Med, evel m'oan dibenn ha ma karen c'hoari,  
Em-eus skubet, siwaz ! leur an ti-skol aliez.

Biskoaz n'em-eus klemmet o chom e pinijenn  
Da houde beza greet eur farserez bennag,  
Leñvet em-eus avad o kaoud ar “zimbolenn”<sup>18</sup>  
Evid komz brezoneg !... goulenn a rit perag !

Ra zigoro Sant Per din dor ar baradoz :  
M'em-eus hen gounezet dre gement a zaelou !...  
Med penaoz pardoni d'an Aotrou skoaler-koz  
D'am beza kastizet 'vid komz yez an Tadou !  
*(Annaig, Lili ha : Roz-Goue*

---

<sup>1</sup> ar “zimboleññ“ : notenn e galleg el leor orin : le “symbole“ ou la “vache“ est un sabot que l’instituteur suspend au cou de l’enfant surpris à s’exprimer dans la langue maternelle. Pour éviter la punition dont ce “symbole“ n’est qu’un prélude, le délinquant doit se hâter de dénoncer le premier camarade qu’il entendra parler breton pour lui repasser le sabot. Et ainsi de suite. Le soir, celui à qui rest le “symbole“, récolte toutes les punitions de la journée.

C’est la prime officielle à la délation. Voilà quels principes moraux on propose à l’enfant breton ! Voilà à quels procédés le gouvernement français ne craint pas de recourir pour étouffer la langue bretonne !

## An dever

Pa roas an Dukez Anna  
D'ar Roue Gall ar vroig-ma',  
An Itron gêz na ouie ket  
'Vije ar Roue dibennet.

Pa lare dim : Setu ho tad !  
Ne ouie ket e ruillje gwad,  
Gwad ar Vretoned, 'vid divenn,  
Eneb d'ar Hallaoued, o fenn.

Ne ouie ket 'vijem, eun deiz,  
Laket d'ar maro 'vid or feiz,  
'Vid on giziou, or halonder,  
Gand ar re ah havas or breuder<sup>19</sup>.

Da gurunenn a Rouanez

---

<sup>19</sup> breuder : breudeur.

‘Zo koustet ker dim-ni, Dukez !  
N’on-deus ket achu d’he faea  
Goude tremenet pemp kant vloa’.

Roet on-desu arhant hag aour  
Ha gwad, pinvidig evel paour ;  
Or poan a room c’hoaz bemdez  
D’ar re ‘deus laeret on danvez.

Petar ‘rofom ‘ta c’hoaz, Anna,  
Pa n’on-deus netra ken brema’ ?  
Roet on-deus on oll mado’,  
Gwadet om beteg ar maro.

Da gurunenn ‘oa brao, me ‘oar ;  
N’eo ket a-walh treo’ an douar  
D’he faea, siwaz ! da Vro-Hall :  
Red e vo c’hoaz madou ‘r Bed-all...

Nahet eo bet an Tadou,  
Nahet ar yez, ar hoz giziou,  
Ar feiz, ar vuhez peurbaduz ;  
Petra ‘vezo greet c’hoaz euzuz ?

Botou-koad ha kurunenn aour  
‘Oa dileh kement en ti ‘r paour  
Evel en palez ar Roue,  
En ez amzer evel hirie.

Pa ‘ou ‘ra ‘gane da votou-koad,  
« Botou-koad an Dukez vad » ?  
Siwaz ! re a lorh ‘oa ennout  
‘Vid mond gand botou-kpad en roud !

D’az heul ‘h om c’hoaz da Vro-Hall,  
Hirie ken paour eged gwechall ;  
Or botou-koad ‘deus seuliou hern<sup>20</sup>,

---

<sup>20</sup> hern : houarn.

Mez or hurunenn ‘zo en spern.

O ! ma breudeur ! savet ho tal !  
N’eo ket warhoaz : hirie, raktal,  
« ‘Tleom troha on hualou  
Ha sevel uhel or zellou.

Kabestr ebed ! Breiz diere !  
Foey d’a Gallo hep trugare’ !  
Mestr ebed ken war an douar :  
An heol evidom oll a bar.

Kabestr ebed a-berz Bro-Hall !  
Mestrz na mestr kennebeud all !  
Dm-ni eo da zibab eun den  
Mar dle unan warnom-ni ren.

Hag ar gwaz-se ‘dleo beza  
Deuz or gwad-ni, deuz ar gwella !

Breiz d'ar Vreiziz ! Deze ar Vro  
Strujusaet gand re varo !

O c'hwezenn, o eskern, o gwad  
A zo sakr d'ar gwez ha d'an had :  
Chomom staget ouz an douar  
A welas o joa, o glahar.

Anna 'zimezas d'ar Roue  
(Daoust hag hi 'rfe c'hoaz hirie ?)  
Hogen nag hirie na gwechall  
N'om ket dimezet da Vro-Hall.

Pep hini d'ar gêr, en e Vro,  
Pe ar gwad amañ a ruillo !...  
Brezi-Izel 'zo douar santel :  
'Vid he divenn kaer eo mervel.

Ar maro 'zo nebeud a dra

Pa ‘mañ an ene da bara !  
An den disterra a vo kreñv  
Mar lak e oll esper en neñv.

Daou dra hepken d’an den ‘zo red :  
Beza diere war ar bed  
‘Vid beva pell dezu an dud fall,  
Ha boud eüruz er vuhez all.  
*(Dre an Delenn hag ar Horn-boud)*

## An hini goz

Eun deiz bennag, An Hini Goz  
A hourvezas 'n he gwele kloz ;  
N'eo ket eun noz, n'eo ket eur zun :  
Pevar-hant vloaz eh eo bet heb dihun...  
Lon, lon la, tra deri lon la...

En-pad mil vloaz meur a Roue  
En-doa bet lod 'en o harante',  
Mez chom a ree beo war o lerh,  
Glan heh ene, glan he horv, 'vel an erh ?

Da diweza 'oa dimezet  
Da Roue Frañs, gantañ karet,  
Rag keillet<sup>21</sup> 'oa bet en yaouank  
He halon c'hoaz ken seder, ken dizank<sup>22</sup> !

---

<sup>21</sup> keillet : touchet

<sup>22</sup> dizank : libr.

Eun abardaez-noz, eur mevel  
A hwezas an tan er hastell...  
Dibennet eo bet ar Roue :  
An Hini Goz a zihunas neuze.

Kant vloavez all 'zo tremenet :  
An hini goz n'eo ket trehet,  
Ha kaer a zo skei war he dor,  
Ne werzo ket d'ar mevel heh enor.

An Hini Goz eo on mamm Breiz,  
Entanet he halon 'n he hreiz :  
« Kentoh, emezi, kentoh mervel !  
Ne vo biken kaillaret Breiz-Izel. »

War le<sup>23</sup> ! Bugale an Arvor !  
Ra zavo ennom ar fulor,  
Ar fulor sakr evid argas

---

<sup>23</sup> War le : war-zao !

Enebourien An Hini or magas.

« Lar din-me petra a rafes,  
Mab karantezuz, ma welfes  
Eun den o tispriz da ouenn-dud ? »  
« Ma dorn pounner e lakfe raktal mud. »

« Ne glevez ket an Ermêziad  
O trouig-komz bemdez deuz e dud,  
Deuz da vreudeur ha deuz da vamm ? »  
« Mar klevfen, ne chomfe ket dinamm. »

« Digor ‘ta da ziskouarn neuze,  
Selaou hag e klevi bemde’  
Kaoziou kazuz an dud diroll  
Me vefe gouest da skei meur a veustaol<sup>24</sup>. »

« Neuze warne te a skoio :

---

<sup>24</sup> meur a veustaol : meur a daol fall.

Emaint o walla da Vamm-Vro,  
O tiskar he brud hag he Yez :  
‘Vid eur Breizad, kement-se ‘zo eur vez.

Ne welet key ‘ta a zo c’hoant  
Da droki dezi he gwiskamany,  
He gizioù hag he feiz, koulz all ? »  
« Malloz ! malloz ! re bell eo ‘h om bet dall ! »

« Truñsenn<sup>25</sup> dero, dered em dorn,  
Me ‘m-eus da frika meur ‘askorn,  
Me ‘m-eus da frailla meur a benn,  
Dered amañ, truñsenn vad, ma zruñsenn.

« Tan ha kurun ! din-me e fell  
Na stoko den ouz Breiz-Izel.  
Gwaz d’an hini a dostoio :  
War e grohenn me zino ma ano !...

---

<sup>25</sup> Truñsenn ; penn-baz

Lon, lon la, tra deri lon la. »  
(*Dre an Delenn hag ar Horn-Boud*)

## **Broad sklaved !**

Maro ennoh evid biken,  
Maro elfenn al librentez,  
Ha sehet ennoh ar vammenn,  
Ar vammenn hwek a garantez.  
C'hoant hoh-eus bremañ d'on lakaad  
Heñvel ouzoh-hu, Gallaoued :  
Koll e vefet 'barz an argad,  
Broad sklaved !

Broad sklaved ! ya, sklaved oh,  
Sklaved eh oh 'baoe daou vil vloaz :  
Roman, Jerman, mui ha muioh,  
O-deus behiet pounner o skoaz.  
Na gand Kezar, na gand Klovis,  
Na kennebeud an Nomaned,  
N'om bet staget gand eun tortis,  
Broad sklaved !

Dizehet om-ni a-viskoaz  
Gand ar c'hoant da chom diere ;  
N'on-deus nepred kollet ar blaz  
Deuz evaj mad or hoz Huñvre.  
C'hwi 'h-eus evet deuz dour ar ster  
Gand hoh enebour kontammet,  
Ha kollet hoh-eus ar sklêrder,  
Broad sklaved !

Ha bremañ 'fell deoh huali  
An neb 'zo chomet dishual...  
An hini 'n-eus renket senti  
'Fell dezañ plega ar re all !  
N'eus gwasoh mestr 'vid eur mevel,  
Pa vez dezañ an dorn roet :  
Mevelie oh a-raog genel,  
Broad sklaved !

Kaer zo bet skei warnom, digar,  
Ni, a spered, 'zo c'hoaz distag.  
Selloud 'reom evel eur par  
Ar galloudeg hag an divag<sup>26</sup>.  
Na glasket ken sklaved en Breiz,,  
Kenteliou mad ne laran ket,  
Mar sav eun deiz ar vez 'n ho kreiz,  
Broad sklaved !

*(Dre an Delenn hag ar Horn-Boud).*

---

<sup>26</sup> divag : disheriet.

## **Evid skeudenn Nominoe**

Morvan Lez-Breiz, ha te maro !  
Maro 'vefe ganit ar Vro ?...  
War da lerh-te, Roue merzer,  
Kavoud 'rafe c'hoaz eur zalver ?  
Piou hen degasfe d'ar vuhe' ?...  
« Nominoe ! »

Morvan 'baeas an droug-kinnig  
D'ar Gall gand houarn en e gig.  
Morvan lazet, setu on Breiz  
D'ar Hallaoued, adarre, preiz.  
War o Roue piou a drehfe ?...  
« Nominoe ! »

Droug-kinnig Breiz, paeet en-deus  
Gand sahadou mein eur vengleuz.  
« Aour dit-te, merer Roue Frañs ?...

Da benn en skudell ar valañs ! »  
Piou an hini 'reas kement-se ?  
« Nominoe ! »

Pa gerz Nominoe, raktal  
Eh eo trehet Charlez ar Moal,  
Trehet eh eo an Normaned,  
Ha Breiz-Vihan 'zo adsavet.  
Ne zent ken 'med ouz eur Roue :  
« Nominoe ! »

O ! Roue Meur ! Roue dispar !  
Dleet eo dit beva er hloar.  
Deuz on broadelez, o ! Tad !  
Dit-te on anaoudegez vad !  
Sell unanet da vugale,  
« Nominoe ! »

Sonet eo eur on addihun,

Mez pa n'out mestr, na vo nikun !  
Hogen, 'vid ma vi ganim c'hoaz,,,,  
Ni 'zavo dit eur skeudenn vraz,  
Ha pignet 'vo war eur mene',  
    « Nominoe ! »  
*(Dre an Delenn hag ar Horn-Boud).*

## Gwerz war stad ar brezoneg

Eur Vro dispar a lugern e-touez an oll vroïou,  
Luskellet en heh huñvre gand mouez don ar moriou,  
Paket he fenn intañvez en eur lenn mougenn hlaz,  
Hag o son war eun delenn hirvouduz ‘vel eur hlaz.

Koulskoude, he-deus mibien gand Doeu dibabet,  
Dre ma oant tud gallouduz, da ziwall garz ar bed,  
Netra barreg d’o sponta na barreg d’o diskar,  
Nag e vefe da goueza an neñv war an douar.

Koulskouden en peb amzer, ‘talh enni da zével,  
Bleuniou aour leun a dudi, bleuniou gwenn leun a vel,  
Ha da bigand er hlazenn, lemm evel noadeier,  
Touriou kaer dantelezet leh ma kan ar hleier.

Koulskoude, ‘n he fardonïou, ‘vez gwelet a-vagad  
Ar c’hoata gwiskamañchou ‘zo bet dirag lagad,

Ar merhedigou flourra ‘deus c’hoarzet d’ar vuhe’,  
An terrupla tud yaouank krouet dre zorn Doue.

Koulskodue, gand he bombard pa hwez he biniou,  
E nij ar gorollerien war askell o zoniou,  
Ha, war beg he meneziou pa gan-hi mesaerien,  
E toull dor ar Baradoz ‘tispak selaouerien.

Perag eta chom kañvuz ‘tal on mamm Breiz-Izel ?  
Perag war an Tremenet e taol bepred he sell ?  
Perag e talh da jali : « Gwechall ! gwechall ! gwechall ! » ?  
Netra, ‘med emañ gwasket he yez gand yez Vro-Hall.

\*

Eun devez etremenis e-kichenn ar houldri,  
Bet enni, ‘pad tri-hant vloaz, douster ha koantiri.  
Bet enni der vilierou koulmed gwenn o kluda,  
Ha moueziou kuñv damantuz noz-ha-deiz o vruda.

Pebez souez pa glevis, diabarz ar houldri,  
O sevel en eur goagal moueziou raouiet ha kri',  
Ha pa welis o vale pe o nijal tro-dro  
Brini du, brini loued, lapoused a varo !

Trehet e oa bet gante ar hudennigou<sup>27</sup> gwenn,  
Mouget o han, o giziou, pen eñvor deuz o gouenn ;  
A gantevdou eurusted na chome ken, allaz !  
Nemed, 'touez al loustoni, pluennou gwenn ha glaz.

Ha me kerkent da zoñjal en Breiz, va Bro garet,  
'Zo ivez gand ar Galleg he yez mastaret,  
Hag e vez klasket bemdez, der bep sort troiou kamm,  
Lakaad he giziou kaerra da gwez' tamm-ha-tamm.

Ma vije bet,emaon-me, leh tammou kudenned,  
Tud a boell hag a galon sort m'eo ar Vretoned,  
'Dije biskoaz aotreet divroiz d'o debri,

---

<sup>27</sup> ar hudennigou : ar houlmed.

Na lapoused divalo da ren en o houldri.

Mez den ebed na gredfe, penn-oh-penn ganeom-ni,  
Deuz ar Brezoneg santel ‘n em lakaad d’enebi,  
Rag biskoaz n’eo bet Breiziz trehet ‘med a-guz-kaer ;  
Hogen, an tu d’hen flastra dre zindan a glasker.

Er skoliou eo bet kavet an noazusa doare  
Da skei gantañ heb ehan taoliou didrugare’ :  
Skolaerien, skolairezed ‘zo mistri a vrezel,  
Roet de’ ‘vid an hini ‘zistrujas ar gêr Iz.

Breiziz zoken a glever war o yez ober fae,  
Gwerzet gante o fluenn, hag o zeod, hag o fe’ ;  
Kerñvaad ‘n on touez ‘ra bemdez koagerez ar brini...  
War-zao, dubeed Arvor ! divranom<sup>28</sup> on houldri !

\*

---

<sup>28</sup> divranom : kasom kuit ar brini.

Dilamm on yez ganeom-ni, ‘ve dilamm n ene ;  
Petra ‘larfe d’ar Breizad ar mor, ng ar mene’,  
Nag an avelioug garo, nag an noz spouroneg,  
Ma vije ken d’o fenta<sup>29</sup> ar geriou brezoneg ?

Kollet e yez venniget, ‘varvfe e oll dudi ;  
Ne vefe ken na c’hoarzin, na karoud, na pedi :  
E Zent koz en ilizou a drofe kein dezañ,  
Hag e anaon a ouelfe ‘n o gwele diwezañ.

Petra ‘larfe d’e galon bombard na binou,  
Koroll na c’hoariadeg, kleier na pardonou ?  
Beteg e wiskamañchou n’o-defe penn na troad :  
Breizad en Breiz a chomfe evel eun divroad.

Mar on-deus ‘ta, Kenvroiz, c’hoant miroud war on zro  
Kement ‘zo bet a-iskoaz nerz ha kaerder on Bro,  
Diwallom on Brezoneg, stourmom ‘vid hen divenn,

---

<sup>29</sup> fenta : liva.

‘Vel ma stourme on zadou, ‘n eur hopal : « Torr e benn ! »

Meur a wech, ‘zo goulennet digand mistri Bro-Hall  
Rei deom kement a wiriou hag a roer leh all :  
Van ebed n’o-deus greet c’hoaz dimeuz on fedennou,  
‘Mez, mar geo yen o halon, ni ‘zo tomm on fennou.

Pennou tomm, div reh kaled !.... Dre on hannaderien  
Ni ‘rank trouzal ha c’hoari, dalhen horz gand ar yenn,  
Ken a dreuzo dioueskouarn ar Hallaoued vouzar ;  
Ha gwaz d’ar gannaderien a gomzo re glouar !

Pep hini ‘ne’ ‘zo galvet da zivenn gwir e Vro ;  
Neb ne garo ket ober ‘vo degaset en-dro ;  
Rag ni ‘n-eus gwirious santel divizet-mad gwechall,  
Pa brizas on Dukezig sevel war dron Bro-Hall ;

Neuez ‘nevoa ‘r Brezoneg hepken urz da ziston  
Dindan ar goabrenn deñval krouet ‘vid ar Breton :

Ar Gall a rankas goulenn aotre ‘benn kaozeal ;  
Hag e fell dezañ hirie minella ar re all ?

Netra ken na houlennom, ‘med bezañ selaouet ;  
Rag biskoaz fae n’on-deus greet war yez ar Hallaoued :  
Evid he homz e trehom zoken war or gorre,  
On skridou ‘vez en Galleg peurvuia beh d’o re.

Netar ken an houlennom, ‘med e vo ‘n on skoliou  
Deuz Brezoneg en Galleg troet ar henteliou :  
Gand ma vont lakaet o-daou war eun heveleb troad,  
Biken ar yez vrezoneg ne varvo ‘n on Broad.

Nann ! biken na zizeho mammenn veo ar soniou,  
Biken ganeom ne davo bombard na biniou,  
Ha, dindan on heol klouar, ‘vo dalhet da youhal,  
‘N eur gana kanaouennou, ‘vel en amzer gwechall.

Neuze, ‘viro Breiz-Izel he stumm hag he gizioù,

Zent ar Vro 'chomo laouen e deun an ilizou,  
Breizad a vano Breizad, ma hallo e dud-koz  
Hen anzav, hen anavezoud, pa deuy 'n o faradoz.

## **Dalh, Iwerzon, eñvor...**

(Let Erin remember)

Kan broaduz Iwerzon

Kan broaduz Iwerzon : notenn, e galleg, el leor orin : Traduit en vers bretons par Toussaint Le Garrec. Voir plus loin une adaptation nouvelle (*Dalh soñj, o Breiz-Izel*), par François Jaffrennou. Ces poèmes, comme l'original, se chantent sur l'air gaélique du Renard Rouge.

1

Dalh, Iwerzon, eñvor amzer gwechall,

Pa droas kein dit mibien fall ;

Pa deuas ar heleh-aour gand Malaki

Stard ouz ar marher oh enebi ;

Gand o Friñsed pa 'h ee, glan o banniel ;

Paotred ar "Bod-Ruz", da vervel !...

Perlezennig wer an tu-mañ d'ar bed

D'an estren a roas e gened.

2

Diwar gerreg Lok- Nik, ar pesketaer,  
Pa varv en noz yen ar sklêrder,  
A wel touriou moal an deveziou pell,  
Dindan ar wagenn don o sevel  
‘N huñvr eou kaer<sup>∞</sup> ivez on spered  
‘Wel aliez an Tremenet,  
Hag a gar dihun, a-dreuz an Amzer,  
Brazderiou bet, kuzet ‘n e donder.

## **Keltia 'vo da viken !**

En o Broig hirie petra 'zo degouezet ?  
Pebez arvest dirag va daoulagad souezet !  
War-zu ar meneziou, en dremmwel, e welan  
Spezou ar re varo o sevel ar beb lann ;  
Me 'glev e mêziou Breiz o son o youhadenn,  
Hag an oll a dremen, buan o redadenn.  
Mez setu, war e varh, Arzur, Roue a Vreiz :  
E-unan !... Va halon a drid e-barz em hreiz !  
« Paotred a Vreiz, eme Arzur, paotred a Vreiz,  
War zao ! war zao ! rag setu deut an deiz !  
Sellit oh an neñvou, lennit ho planedenn :  
O ! na skeduz ema hirie ho steredenn !  
Or gouenn a oe gwasket, siwaz, bete vremañ,  
Mez Doue ar Gelted, Doue, Mestr ar bed-mañ,  
En-deus c'hoant da zastum lodennou or gouennn greñv :  
A-raog 'ta, mignoned, ha sellit oh an Neñv ! »

Selaouit ! selaouit ! En amzer dremenet,  
Gwechall, gouenn ar Gelted ne oa ket chadennet :  
Ar Gelted a veve digabestr, heb mistri  
Nemed o Rouanez, du-hont, e Bro-Geumri,  
E Skos, e Kerne-Veur, ha sellit oh an Neñv ! »

\*

Selaouit ! selaouit ! En amzer dremenet,  
Gwechall, gouenn ar Gelted ne oa ket chadennet :  
Ar Gelted a veve digabestr, heb mistri  
Nemed o Rouanez, du-hont, e Bro-Geumri,  
E Skos, e Kerne-Veur, en enez Iwerzon.  
Ar Gelted a gare o Bro a wir galon  
Rag, du-hont, ar Varzed a gane c'hoaz bemdeiz  
En eru zeski d'an dud ar garantez 'vid Breiz.  
« Setu ar Romaned a zeu dre vandennou  
Hag ar Gelted trehet 'deus pleget o fennou ;  
Mez souza 'rit d'ho tro, Romaned, hag on gouenn

,Er mêziou a Vreiz-Veur a gan o hanaouennou.

« Mez petra zo nevez, siwaz ! e Bro-Geumri ?

Setu ar Zaozon fall a zeu war o listri ;

Ar Zaozon a zered e bern, hag e peb leh

On tadou a houren... r Zaozon a zo treh

D'ar Gelted, hag or gouenn a houzañv adarre...

« Meneziou uhelloh evid Menez Arre,

Du-hont, e Bro-Geumri a zav o hribennou.

Kuzet e-mesk ar hoabr e red tro d'o fennou ;

E troad ar meneziou e weler ar mor glaz.

Tud a ouel war an aod, achuet an emlaz..

- O ! Paotred Vro-Geumri, red eo deoh dilezel

Ho parkeier moustret gand an dud a vrezel !

Koulskoude, 'raog mond kuit war gein ar gwagennou,

Nerz ho kouenn a zistro e-barz ho kalonou :

Ho Rener a gemer e gleze ha souden

A ranna e laonenn houarn e diou lodenn,

Ha war-lerh e lavar : « D'ar re a chom amañ

E roan da vired ganto al lodenn-mañ ;

An eil lodenn ganeom a vezo miret mad.  
Evel-se e soñjim, en or Bro, er stourmad  
Leh gand ar Zaozon fall Bro-Geumri ‘oe trehet.  
Bro-Geumri ! Bro-Geumri ! or Bro muia-karet !  
Mez greom or himiad d’or breudeur, d’on tadou,  
Hag en amzer da zond kerzom war o roudou ! »  
An noz yen a ziskenn bremañ war an douar...  
Al listri a ya kuit da sklêrder al loar.  
O diaraog war-zu ar hreisteiz ‘zo troet  
En eur gas war ar mor ar Gelted divroet...

\*

Etre kerreg Penmarh, ‘tre Roazon ha Naoned ;  
Hag e-kreiz ar hoajou tud a zo dastumet :  
An dud-ze ‘zo deuet euz a Geumri. Bremañ,  
Ez int prest da zevel da viken ar Vro-mañ,  
On Breiz, on broig vad, douar an dero braz,  
Bro a bado beteg ma pado Beg ar Raz !

Mez setu on Sent koz a zered bete Vreiz  
Da brezeg en ano Doue dem ar wir Feiz.  
-Tud kaloneg, kuitet ho-peus hoh Iwerzon  
Da zoned er hoajou, etre Brest ha Roazon,  
E leh feiz an Drouized 'zo chomet bepred beo....  
Klevit ! e Breiz-Vihan setu trouz an hekleo  
A lavar aliez meuleudi ar Zalver !  
En-dro d'ar manati, e peb leh, e kaver  
Parkou, prajou, digand ar Veneh digoret...

Mez eun den a lavar, du-hont : « Breizad bepred ! »  
Me hen anavez mad : setu Nomenoe !  
Etrezeg an den-ze ar Vreiziz a droe  
War eun dro o zellou en eur houlenñ gantañ  
Da ziwall o ziez, o madou dioh an tan  
Enaouet e peb leh gand an enebourien...

-War mêz ar stourm, paotred ! nag a vrezelourien !  
Ar hlezeier a sko : an enebour a deh,

Hag ar Vreiziz a zav o halonou d'an neh  
En eur drugarekaad Doue Oll Halloudeg...  
Enorm, enorom, ar Roeu kaloneg,  
An Duk Nomenoe, tad-koz or Breiz karet,  
Ha, war ar memez tro, kriom : « Breiziz bepred ! »

Gouenn ar Gelted, war-lerh, e-pad nao-hant bloavez,  
A vir he nerz dispar, he gizioù hag he yez ;  
En eur vond koulskoude gand an hent hir ha striz,  
Ar Gelted a houzañv meur a wech poaniou kriz :  
Adaleg ar Hreizteiz betek an Hanternoz  
Iwerzon a blega dindan galloud at Zaoz ;  
Me a wel he mibien a ya kuit divroet  
Beteg an Amerik da galsk o zammig boued ;  
Int a zavo, du-hont, eun Iwerzon nevez,  
Leh e vezo komzet da virviken o yez.  
On Breiz a ouel bremañ d'he frankizioù kollet,  
Mez or gouenn goz a chom atao ar ouenn galed.

Paotre a Vreiz-Vihan, ha paotred Vro-Geumri  
A varv dre oll bemdeiz da zivenn o mistri !  
-Me ho salud, Kelted, dreist-oll c'hwi tud a vor,  
Kelted euz a Vreiz-Veur ha c'hwi, Kelted Arvor !

\*

Sellit ! sellit bremañ ! Or gouenn n'eo ket maro !  
Ar Gelted en Kerdiz a zered war eun dro :  
En eur zal vraz, du-hont, setu ugent-mil den  
A zo deuet, renet gand sked o steredenn ;  
Or gouenn he-deus miret, daoust d'an amzeriou fall,  
An diou lodenn euz ar hleze rannet gwechall :  
An daou damm 'zo staget en eim ouz egile.  
-Bez laouen, bez laouen, Bro-Geltia a ouele !...  
Selaouit ! ar Gelted a gan bremañ 'n eur vouez :  
Teneret e vije kalon al loened gouez.  
Dublin ha Kernarvon a zegemer d'o zro  
Gouenn ar Gelted deuet dezu a bep korn ar Vro.

Hirie tavit, evned ! Hirie, tavit, steriou !  
Kanaouenn ar Gelted a nij dreist d'ar moriou...  
-Kerzit, moueziou sklinton, bete penn all ar bed !

Ya, houmañ chom atao ar ouenn nerzuz meurbed !  
Ar poblou a varvo, diskaret gand kozni ;  
O broiou a zeuio d'o zro or broiou-ni,  
Bremañ ar poblou all n'o-deus mui bugale,  
Mez ar Gelted yaouank a gresko hebdale ;

Ar re-ze 'gemero patron diouh o zadou  
On Doue a skuillo warnezo e vadou,  
'N eur lavared dezo : « Bevit oll beb anken,  
Rag ho kouenn hag ho Pro a bado da viken ! »  
(1905)

## Emgann Alre

**Notenn, e galleg, el leor orin :** Cultivateur comme ses ancêtres, Yves Quérou (Erwan Kerou) est né dans la maison familiale qu'il n'a jamais quittée, à Lez-Ketal en Plougonver (Trégor), le 27 août 1873. C'est vers 1906 qu'il commença à écrire des poèmes bretons qu'il a publiés dans *Kroaz ar Vretoned*, *Ar Vro*, etc., et qui furent, plusieurs fois couronnés par le *Gorsedd des Bardes*. Outre *Emgann Alre* qu'on va lire, signalons son poème *Meuleudi Ar Skourr* en l'honneur de Jean-Marie Le Scour, le regretté "Barz Rumengol" (*Ar Vro*, mars 1913).

## Emgann Alre (kanaouenn)

Er bevarzegved kantved, e oa straket 'n on hreiz  
Eur brezel didruez diwar-benn Herez Breiz ;  
An Istor hen rannas etre pevar skoulad,  
Hag euz ar bevared 'fell din komz eur pennad.

Er bloavez trizeg kant pevar ha tri-ugent,

E-kichenn kêr Alre e oa garm ha skrign dent :  
Etre ‘n diou gostezenn ‘krogas eun emgann kri’,  
E leh emañ bremañ, me ‘gred, ar Chartrouzi.  
Charlez Bleiz a grede an amzer a oa mad  
Da reizha eun tabut a-zoare ‘vid e vad :  
Ar brezel evid mad ‘oa gantañ adskoilmet,  
Mez ne hoarvezas ket ar pezh ‘n-evoa soñjet.

Arru ‘kichenn Alre, pep hini ezu e du,  
A renkas e arme ha d’an emgann dustu.  
An evned ‘oa tavet, ne glever mui o han,  
Ne glever tro-war-dro nemed trouz an emgann,  
Garm skiltr ar stourmadeg ouz hen heuill ar maro.

Eter an diou arme e oa stank an taoliou.  
Tud Montfort ha Bleiziz entanet o lagad.  
Ouz o hlezeier dir e tivere ar gwad ;  
Taoliou goaf ha bouhal, e-kreiz ar stourmadeg,  
‘Lakont war an douar kalz a wad da redeg.

An diou arme bepred, koulz an eil hag eben,  
‘Stourme ouz o gwasañ ‘vid diluzi ar gudenn.  
Ar Hallaoued ‘oa koll : e-kreiz an emgannleh,  
Charlez Bleiz ‘zo lazet. Tud Montfort a oa treh !  
Ar Vreiziz, a-viskoaz ‘oa brudet er brezel,  
En Alre ‘oant c’hoaz treh... Enor da Vreiz-Izel !  
Korv Charlez ‘oa kavet war dachenn an emgann,  
Tizet ‘oa d’ar maro ‘n e stourmad diwezañ.  
Neuze Bertran Gwesclin, e penn ar Frañsizien,  
A oa bet prizoniet war ar memez tachenn.  
Gwreg Charlez a oa bet eun tamm mad re benneg,  
Hi hepken eo e oa d’an emgann-mañ kirieg,  
Dre na fellas ket dezi lodenni ‘n Dukelez,  
E oa bet penn kirieg da varo ‘n Kont Charlez.

Montfort ; goude maro e enebour touet,  
War ano “Yann Pevar“ a oa Duk ar Vretoned.  
Goude, pa oa fellet d’ar Roue a Vro-Hall,

Stagañ Breiz ouz ar Frañs, lakaad dezi eun hual,  
Gwreg Charlez 'n em lakaas, gand he zud evelti,  
Dindan banniel Duk Breiz, mouget he hasoni.  
*(1911)*

## **Gwazoniez an Duk Arzur III**

Selaouit, tud digalonet,  
Eur werz a zo nevez savet !  
Gwechall, eur Breizad, eur Priñs braz,  
‘Vid ar re Bro-Hall a stourmas !

Pa oe laket Duk en on Bro,  
Breiz ‘oa digabestr tro-war-dro...  
Koulskoude Montfort)l’ Amaury  
‘N-eus ket laket Priñs da hoari.

Rag ar hontech-mañ, tu Pariz,  
‘Oa gwazonet er parfet giz !  
N’eo ket evel-se deuz on Breiz,  
Bro lirzin, kalon en he hreiz.

Richemond ‘vizitas Roue,

War an douar serjant<sup>30</sup> Doue !  
An Duk Arzur a lavare  
Da dud an ti, pa arrue :

« Demad ha joa, Aotrou Roue !  
demad ha joa, va Aotroune' !  
Dudi, dudi,o ! Rouanez !  
Karantez deoh ha levenez ! »

Koulskoude Priñs, 'vid ar honte<sup>31</sup>,  
Bezañ daoulinet e tlefe ;  
Ar Saerourien o-deus mennet  
'Vid Breiz ivez Duk daoulinet.

-« Roue ! 'vid Breiz na zaoulinan ;  
'Vid ar hontech tar na laran. »  
« Grit 'ta hervez ho plijadur »,

---

<sup>30</sup> serjant ; galleg "sergent"

<sup>31</sup> honte : galleg "comté"

Eme Roue d'an Duk Arzur.

Duk, 'vid on Bro, en em dalhas,  
Ha, gwaz Kontech, a zaoulinas !...  
Evel-se, ma hêz mignoned,  
Dirag ar Frañs ni 'zo gouestlet,

Mez, mar greñfve on sperejou,  
Ar pennou braz hag on mestrou ;  
War on zao ! paotred Armor∞  
Tud kreñv ha kaloou digor !

## Va gouenn

Koz eo va gouenn, evel ar bed,  
Uhel he fenn ‘barz an Anken,  
Gortoz a ra heb aon ebed  
Ar boan a zo he Flanedenn !  
Abaoe m’eo mibien Gomer<sup>32</sup>  
Pellaet an eil dioh egile  
Daou vrank eur wezenn a weler  
O skuilla disheol war mein-Be’<sup>33</sup> !

‘Touez ar Haeled lugernuz,  
Hag ar Vretoned kreñv ‘vel dir,  
Tro ar wezenn ‘vatee euruz  
On hendadou a vuhez hir...  
Dindan lagad Ior<sup>34</sup>, Tad an Dud,

---

<sup>32</sup> Gomer : notenn el leor orin : père des Celtes.

<sup>33</sup> mein-Be’ : mein-bez

*Ior*<sup>34</sup> ; notenn el leor orin : dieu suprême des Druides celtiques.

Kreski 'ra an deliou nevez,  
Hag ar hev kiz a gav e vrud,  
Flouret gand alan an Êlez !

Gwalhi a ra an Anaon  
Peb gouli greet d'ar Gelted  
Gand bouhal-vrezel ar Zaozon  
Ha gwall-lezenn ar Hallaoued.  
Pa houzañv ar Helt 'n e galon,  
Dre vroud lemm ha kriz ar Glahar,  
E hendad Gael pe Vreton  
A skuill balzam dous ha dispar.

Plennaad a ra 'n hent diompez.  
Ya ! dre 'n Abred<sup>35</sup> ankeniuz,  
Deuz an Annouf ken dienez

---

<sup>35</sup> Abred : notenn el leor orin : c'est, dans l'enseignement druidique, la vie présente.  
*Annouf* : notenn el lero orin : c'est l'état des âmes qui attendent leur incarnation.

D'ar Gwened<sup>36</sup> laouen ha skeduz.  
Lugerni 'ra 'vel eun tour-tan  
O rei sklêrder, an nerz-kalon  
D'ar Helt spontet e tremenvan,  
'Vel eur vagig war ar Raz don !

Gwell a ra e-kreiz an arne'  
War ar re a zo divroet,  
O Flanedenn, chif o ene  
O hasas pell bepred nehet !  
Mez an hini a gleo ar vouez,  
Mouez klemmuz e dadou-koz,  
Hennez a zistro d'e barrez  
Leh 'mañ e eskern o repoz !

An Tad-koz 'lar d'ar re veo,  
Berr gwelet ganto ar vuhez,  
'Ya o gwrizienn dreñk ha c'houero

---

<sup>36</sup> Gwened : notenn el leor orin : c'est le Monde blanc, le Paradis.

Don en tu all da doull ar bez !  
O soñjal ‘n e ouenn greñv meurbed,  
Ar houer a anvez e vrazder ;  
Dijentiled eo ar Gelted,  
Noblañsou kosoh na gaver !

Anaon, skoazell kreñv Ior,  
(Den maro a vro Breiz-Izel,  
Sidh<sup>37</sup> Iwerzon, kiant ‘vel eun Êl),  
Gand da Youl, en pep tu d’ar mor,  
Ar Yez santel bremañ ‘glever !  
Anaon, mestr d’ar hantvejou,  
E peb leh hag e peb amzer  
Sentuz on d’az kourhemennou !

---

<sup>37</sup> Sidh : notenn el leor orin : nom générique de la fée islandaise.

## Gwir Vretoned

### Diskan

Gwir Vretoned, tud a galon, war zao !  
Da gana glaor da Vreiz or Bro,  
Ha da ziwall teñzor he bugale :  
Ar yez, ar peoh,al liberte ;  
War-zao ! war-zao ! ha beteg mervel  
Stourmom a-unan evid Breiz-Izel !

O ! va Breiz, gand da douriou brudet,  
Da vor glaz ha da veneziou,  
Da vrug ruz, ha da lann alaouret,  
Te 'zo koant dreist an oll vroiou !

N'ez eus ket, 'vel e-touez or herreg,  
A dud vad, seder ha nerzuz ;  
N'ez eus ket, 'vel en or brezoneg,  
Soniou drant, gwerziou dudiuz.

A ! siwaz ! ouz ar Frañs digristen  
Breiz-Izel a zo chadennet,  
Ha, d'he heul, e venn koll da viken  
He brud vad, he nerz, he hened.

Bretoned, savom or halonou,  
Ha touom a talhim atao,  
Da vale war roudou on tadou  
Keit ha ma'z ay ar bed en-dro !

## **Ar bugel hag ar Barz**

« Lavar din-me, va mignonig  
A be Vro out-te genidig ? »

« E Breiz-Izel on bet ganet,  
Ar gaerra bro eo euz ar bed. »

« Lavar din c'hoaz, paotr ar mêziou,  
Petar ganez en da zoniou ? »

« Em zoniou, me 'gan Breiz-Izel,  
Bro goz ar Zent, douar santel ! »

« Lavar din-me, paotr an Arre,  
Petar 'zoñjez war ar mene' ? »

« E-keiz ha ma peur va deñved,  
Me 'zoñj en amzer dremenet,

Me 'zoñj en amzer dremenet,  
Pa oa Breiz dindan an Duked. »

« Hag e teu din hekleo trouzuz  
An amzerou-ze ken eüruz. »

« Ha petra 'lavar d'az kalon,  
o ! bugel Breiz, o ! gwir Vreton ? »

« Lavared a ra d'am halon  
Eo dleeet din frankiz wirion :

Frankiz evid kared va yez,  
D'he homz e peb leh bemdez ;

Frankiz da veza gwir gristen,  
O kared Doue hag e lezenn ;

Frankiz da vired gizioù koz

Va zadou, hervez va mennoz.

Ar frankiz-se 'zo bet laeret  
D'am Bro, en amzer dremenet. »

« Lavar din, o ! mab an Drouized,  
Gand piou out-te bet kenteliet ? »

« Skoliet on bet gand eur mestr mad  
Euz ar vro-mañ, eur gwir Vreizad. »

« Lak en da galon a vugel  
E savo da Vro Vreiz-Izel ;

Da Vro dispar, kred, a gavo  
Ar peoh, eun amzer a deuio,

Hag e-pezo ar wir frankiz  
Da heulia yez, gizioù ha feiz ;

Kendalh, va mab, da veza fur,  
Hag, eun deiz, ‘Barz te a vo, sur ;

Hag e labouri a-zoare  
Da zével Bro-Vreiz adarre ;

Hag e prezegi d’az proiz,  
Karantez Bro goz an Drouiz.

Sevel a ray eun heol nevez,  
Kred, war an Arvor, eun devez.

A-barz pellig, me ‘lavar c’hoaz,  
E Breiz ‘vo cheñchet penn d’ar vaz !

Da hedal, o8 Breizad yaouank,  
Kan e Brezoneg gwerziou stank ;

Lar d’ar Vretoned, da genvroiz,

Ez out euz gouenn an Arvoriz,

Hag e kavfes gwelloh mervel

Eged trei kein da Vreiz-Izel.

*(Mouez Reier Plougastell)*

## Hirvoudou ar barz

Lakaet em-eus don em halon  
Teir garantez ar gwir Vreton :  
Doue, ar Mestr braz gallouduz,  
Breiz-Izel, hag he yez paduz.

E-pad pell amzer, va zelegg,  
Gwechou klemmuz, aliez laouen,  
En draoñienn ha war an uhel,  
He-deus sonet dre Vreiz-Izel.

C'hwezet em-eus eun tan santel,  
Eun tan nerzuz dre Vreiz-Izel :  
Karantez Doue hag ar Vro  
A zeblante prestig maro...

Kanet em-eus e brezoneg  
Kalz kanaouennou kaloneg,

Ha douget d'ober evel don  
Kement a zo bet dindannon.

Kana 'ran c'hoaz a-bouez va fenn  
E yez va Bro, gand an delenn,  
Kanaouenn skiltruz an emzao...  
Gwaz evid neb na zelaou !

Kanet em-eus mil meuleudi  
D'am Bro Breiz-Izel gand dudi  
Ha lavaret a-wal d'an oll :  
N'eus kaerroh bro dindan an heol.

Va halon he-deus bet tridet  
Ouspenn eur wech gand eürusted,  
Em labouriou evid va Breiz,  
'Vid ar Brezoneg hag ar Feiz.

Kalz tud, siwaz ! 'zo en-dro din,

Evel, diskiant, o c'hoarzin,  
O c'hoarzin goap pa brezegan  
Er yez venniget a garan.

Ouspenn e hijont o diskoaz  
Pa lavaran dezo : Biskoaz  
Ar Brezoneg koz ne varvo !  
Ra hoarzo goap neb a garo !

Aotrou Doue, pegoulz eta  
E welfom Breiz en he haerra,  
Ar hleze dir en he dornig,  
Gand banniel wenn an erminig ?

Pegoulz on-devo ar Frankiz  
Da veva didrouz en or Breiz ?  
Pegoulz on lezo an estren  
Da heulia on giziou kristen ?

Aliez, p'on va-unanig,  
O weled Breiz ken reuzeudig,  
Me am-eus skuillet war va Bro,  
En-dra 'hellen, daelou c'hwero'...

Setu em halon diwanet  
Eur c'hoant ha n'am huita nepred ;  
En deiz, e ra va oll soñjou,  
E-pad an noz, va huñvreou :

O ! mar plijfe gand ar *Gorsez*  
Va degemeret, eun devez,  
E renk ar Varzed enoruz,  
Pegement e vefen eüruz !

Evidon e ve eun herez  
A vuhez all, buhez nevez,  
Implijet e servij va Bro,  
Beteg ma teuy din ar maro ?

Me ‘fell din beza abostol,  
O prezeg uehl dirag an oll  
Karantez Doue hag ar Vro  
Ha nerz kalon ‘barz en Emzao !

O ! Breiz, va Mamm, en-dra ‘hellin,  
‘Vid da zevel e labourin ;  
Hiviziken, ‘fell din kerzed,  
Va daouarn e re ar Varzed !  
*(Mouez Reier Plougastell)*

## War zav

Na me ‘garfe e ve va mouez  
Klevet e Breiz, e pep parrez !

O ! va Bro ger a Vreiz-Izel,  
Bro ar Varzed, douar santel,

Ar Gall a hoanta touella  
Da vugale ‘vid o zraella<sup>38</sup>,

‘Vid laza da spered kristen,  
Ennout eet ken don e wrizienn,

‘Vid laza da yez venniget,  
A garfe gweled dilezet,

‘Vid laza da gizioù brudet,

---

<sup>38</sup> o zraella : dispriza.

Pennabeg euz da eürusted...

Gouzoud a ra ema aze  
Buhez pe varo da ene.

War zav ! war zav ! oll Vretoned.  
Gouenn an dud kreñv, pennou kaled !

Penn d'an enebour aheurtet !  
Biken gantañ ne vim trehet !

Biken or yez ne vo lezet  
Da veza e Breiz diskaret !

Da Zoue ha d'or Breiz-Izel  
Oll bepred e vezim fidel.

Kentoh 'kerfem mervel mil gwech  
Eged rei abeg d'eur rebech !

## **Mouez eun delenn**

(lodenn)

Eun noz, war ma harreg, e oan o tiskuizañ,  
Dibeh hag evuruz ‘vel ma ven peurvuiañ...  
Soñjal a reen en Breiz hag en amzeriou kaer  
Ma on enni an oll digabestr, dibreder,  
Ma rene en peb leh ar peoh, al levenez,`  
Ar gizou mad ha fur hag ar wir zantelez,  
Ha soñj an amzer-ze, seder ‘vel eun huñvre,  
A ree din hirvoudi war stad ma Bro hirie...  
Gwechall goz, emezon, e save ar Varzed  
Evid divenn dalhmad Erminig ar Vretoned,  
Pa felle d’ar Gall brein pe d’ar Zaozon treitour,  
Gwaska douar Arvor, kerkent ‘vel eur gedour,  
‘Vije gwelet peb Barz o kregi ‘n e delenn  
Hag o teurel dre-oll garm skiltr ar Stourmadenn.  
D’e vouez kreñv ha nerzuz ar Breizad a zave,  
Hag ar Gall hag ar Zaoz deuz ar vro a dehe.

Perag ivez hirie na glever ken n on Bro,  
Pa'zom ken gwallgaset, korn-boud ar brezelo' ?  
Pegeid, o ! ma Doue, e vo c'hoaz Breiz-Izel  
Gwasket ha mastaret gand an estren diboell ?  
Daoust hag en on amzer n'eus ken ar memez gwad  
O virvi birvidig en kalon ar Breizad ?  
Daoust hag aliou fur on Barzed koz karet  
'Vefe ganim hirie dilezet, ankounahet ?  
Ha ma mañ c'hoaz ennom tan sakr o harante',  
Perag ne zav dre-oll Barzed taer evelte,  
Ma adkembro Breiz gand he furnez gwechall  
He nerz hag he brazder en-touez ar poblou all ?...  
(*Bleuniou Yaouankiz*)

## Ano ar barz

(lodenn)

« Deuz an amzer goz eh om, ar Varzed ;  
Karoud ‘reom c’hoaz Bro ar Vretoned !  
Klevet on-deus bet, dimeuz on bez don,  
Hekleo ar Horn-Boud en êr o tiston ;  
Klevet on-deus bet dindan troad ar Gall  
On Broig Arvor o klemm ‘vel gwechall !...  
Hag om bet savet dimeuz on bez yen  
Evid starda c’hoaz keren on zelenn.  
Siwaz ! ar maro kriz ha didrue’  
‘N-eus war on diouyeuz<sup>39</sup> lakaet eun alhwe’ :  
N’hallfom biken mui, en despet d’on c’hoant,  
Ober d’on zelenn kana taer ha drant !  
Kemer ‘ta houmañ, Breizad a galon,  
Gra dezi son bepred dispont hag heb aon  
Evid da Zoue, ‘vid da Vro garet,

---

<sup>39</sup> diouyeuz : on daouarn..

Ha dreist-oll evid da yez venniget.  
D'ar gwir Vretoned argaset 'n o Bro  
Degas bremañ soñj dimeuz o zado',  
Lavar de' penaoz bagig ar Gelted  
Nan eo bet biskoaz gand ar Gall trehet...  
Ar roh a zo Gall, mez eul levier mad  
Er stur a zalh krog : bezañ eo Breizad !  
Bezañ eo Breizad, bezañ eh eo Barz ;  
E yez eo ar stur an hini<sup>40</sup> a harz  
Al lestr dond da goll : anvet eo Ar Vro.  
Oll o labourad en-dro dezañ 'zo,  
Martoloded vad ha gwir Vretoned,  
Tud taer a galon, tud a lealded !  
Gand an unvaniez, en despet d'ar Gall,  
Al lestr a gerzo daoust d'an amzer fall.  
Bez eta dispont, labour 'vid da Vreiz ;

---

<sup>40</sup> an hini ; pehini, er skrid orin.

Goude 'n amzer fall ar mor a deuy reiz.  
Dibab eun "ano", kan war an delenn,  
'Vel ar Vrazed koz : « Breiz da virviken ».  
(*Bleuniou yaouankiz*)

## **Bevet ar varzed**

*Notenn el leor orin : Pour être chanté sur l'air Bhyfelgyreh Gwyn Clamorgan, Seziz Gwengamp, ou Zao Breiz-Izel.*

O ! ma Breiz-Izel, ma Mamm-Vro garet,  
Eveldout eru vro all n'eus ket !  
Evel da Varzed n'eus ket bugale !  
O-bez eta lorhuz gante !...  
Kana a ra an oll dre ar bed :  
Bevet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

Adaleg ar penn kenta da amzer,  
War da zouar ar Varzed taer  
A gemere lod en ez levenez,  
Hag a ouele war da enkrez ;  
Ar Barz ha Breiz a gerz a-gevred :  
Bevet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

En ez koajou don, an amzer goz-koz,  
Ar Varzed, bemdez ha bemnoz,  
A roe kentel ha a gelenne  
Ar Breizad war ar Wirione' ;  
Breiziz a zo tud a lealded...  
Bebet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

Ar Varzed a zo, dimeuz a Vro-Vreiz,  
Skeudenn ar gizioù fur ha reiz ;  
War gerden o zelenn, en eur gana,  
Ene Breiz-Izel a drida...  
D'o mouez entanet an oll a zered.  
Bebet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

Pa waske César hag ar Gall Arvor,  
Pa dreuze ar Zaozon ar mor,  
E taoler neuze an delennourien  
War beb menez o galvadenn :  
War zao, war zao ! A-raog, Bretoned !

Bevet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

Ouz son an delenn, en kreiz an argad,  
Arvoriz a skuille o gwad ;  
Klevet e vijent spontuz o yudal :  
« D'ar gwasker, yorr-e-benn raktal !  
Ar horn-boud arm 'zo skiltruz meurbed....  
Bevet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

'Dreuz d'ar hantvejou beteg fin ar bed,  
Tra vo dre aamñ Bretoned,  
Marzin hag Arzur, Gwennhlann ha Riwal  
A rey d'o mibien, 'vel gwechall,  
Nerz o halon, tan sakr o spered...  
Bevet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

Daoust da bep heskign, ar Barz a vezo  
Eun divenner feal d'e Vro :  
En despet d'an oll, hervez e galon,

E harpo ar Frankiz, heb aon,  
E taolo : « Ar Gwir eneb d'ar Bed ! »  
Bebet ar Varzed ! bevet ar Varzed !

E leh 'vo trubuill, poan-spered, anken,  
E leh ma vo an dud laouen,  
E teuio ar Barz, den madelezuz,  
Da zsitan peb glahar mantruz,  
Ha da greski an evurusted...  
Bebet ar Varzed ! bevet ar varzed !

Heb ar Varzed vad, yez kaer Breiz-Izel  
A deufe, siwaz ! da vervel ;  
Deuz ar maro e hall beza dineh  
Bleunia a rey hirie 'vel deh...  
Ar Brezoneg a vevo bepred.  
Bebet ar Varzed ! bevet ar varzed !

Pa zegouez d'eur Barz kousked war e erv,  
Pa gouez e gorv dindan an derv,  
E krog eur Barz all kerkent 'n e delenn,  
Hag e stenn reud dezi he herden,  
Da gana nerzusoh d'ar Gelted :  
Bebet ar Varzed ! bevet ar varzed !

Tra ma vo Barzed e-barz ar Vro-mañ,  
Ar Vretoned 'vo ar gwellañ,  
Ar galloudusañ en-touez ar poblou,  
Ar furrañ en-touez an dudou.  
Tud a gredenn stard, pennou kaled....  
Bebet ar Varzed ! bevet ar varzed !  
(*Bleuniou Yaouankiz*)

## **Me a zo Breizad !**

Nag eo dous d'an den, pa'z eo divroet,  
Soñjal ar vroig e leh m'eo ganet,  
Soñjal er mêziou en-desu bet karet...

Hag evid karoud ar Vamm-Vro da vad,  
Ez eo red tehel outi eur pennad,  
Bezañ 'n eur vro all 'vel eun divroad.

Neuze e teuer d'he meuli ouspenn  
Ha da gavoud kas deuz neb he dispenn,  
'Vel da 'n em dana prim diwar he fenn.

Dudi 'ra d'an den anzañ e Vamm-Vro ;  
Pa vez pell outi morse n'he naho ;

Er hontroll, dalhmad, d'an oll he meulo.

Da galon peb den ma talh an dra-mañ,  
D'ar galon vreton e talh ar gwasañ,  
Dreist-oll, er servij, ez eo ar startañ !...

Eno e tihun birvidig 'n e greiz  
Ar wir garantez, karantez e Vreiz,  
A skañva enni an anken direiz.

Eur soudard breton, en servij Bro-Hall,  
Eun devez, en-touez ar zoudarded all,  
A zoñje 'n e Vro, 'n e vuhez gwechall ;

Dirag e spered, laouen ha seder,  
E tremene skañv e yaouankiz kaer,  
Pa glevas eur vouez a houlenn ken taer :

« Daoust ha c'hwi 'zo Gall, laret, ma den mad ?... »

Kerkent en e greiz e saillas ar gwad :  
« N'on ket ! kabiten, me a zo Breizad ! »

« Me a zo Breizad !... Pebez penn-kaled ! »  
E laras raktal an oll zoudarded,  
« Hennez 'gar e Vro dreist pep tra er bed ! »...

(Vel ar soudard-mañ direbech, heb aon,  
Pep Breizad 'dlefe huchal gand kalon :  
« En despt d'ar Gall, me a zo Breton ! ».  
*(Bleuniou Yaouankiz)*)

## **Damb arnehe**

*Deom warneze*

*(Skrivet e gwenedeg. Gand Embann an Hirwaz ez eo bet lakaet e K.L.T.)*

Selaouet, tud yaouank, tud koz ha bugale,  
Peizanted, duchentil, labourerien ive’,

Ha c’hwii ‘glevo eur zon a-nevez zo savet,  
Evid divenn rr Bro hag or yez venniget.

Arru e’ an amzer, evidom, Bretoned,  
Da zevel or pennou heb douja den ebed.

Pell er-walh e om bet goapeet ha disprizet ;  
Komañs a reom skuiza dre forz boud gwallgaset.

Evid paea ar gwad on-eus skuillet ‘vite,  
Ar Hallaoued, hirie, on flastra garfe :

## Ya, me 'gano...

... hag en yez ar Breizad e vo !  
Na pa vez and an oll kaset,  
Ganin bepred ne vezo ket.  
Me 'zo bugel ar Meneziou,  
Bugel ar Parkou, ar Hoajou ;  
Ma yez a vezo mouez an dour,  
Mouez ar hleier en beg an tour,  
Mouez an avel-gorn, pa yuda,  
Ha mouez ar gurun, pa straka.

Eur vouez rust eh eo marteze,  
Hogen n'eus forz ebed da ze !  
Ma zud, em raog, er memez stumm,  
O-deus komzet a rumm da rumm.  
Ar Brezoneg evidon-me  
A zo ken santel hag an neñv ;  
Abalamour da ze lakin

Ma oll galloud ha ma ijin  
D'hen delhen en buhez bepred  
En-mesk gouenn tud ar Vretoned.  
Kalz a zo o heuill memez hent,  
Re all a zeuy c'hoaz a oa kent  
Dizoursi deuz ar pezh a zell  
Ouz yez Gorenn<sup>41</sup> Breiz-Izel...

Rag mar 'n-eus c'hwezet, an deiz all,  
War Vreiz-Izel eun avel

Dichadennet dezu tachennou Bro-Hall,  
Diwar gribennou steun ar Hragou hag Arrez  
Eun all en-deus yudet eneb dezañ gand pres ;  
Eun emgann etreze nevez zo 'zo savet.  
N'e( ket laret 'vo mestr avel ar Hallaoued.  
Meru a Vreizad, chomet beteg-henn didalve'  
A zav e choug, pa glev tremen an avel-ze !

---

<sup>41</sup> **Gorenn : gourenez.**

Stroñsal 'ra en e greiz e galonbaour laouen,  
Hag eun harlink a joa 'red e gorv penn-da-benn.

Seul vui ma vo Breiz gwalgaset,  
Seul vui 'vo gwelloh sikouret,  
Ha meur a yez, me a zo sur,  
Da vro an Ankou a vo eet  
A-raog ma vezo dilezet  
Hini mibien-vihan Arzur.

## **Kan-bale Soudarded Lemenig**

Eur youhadenn am-eus klevet  
War horre on Bro venniget.

A-raog ! soudarded Vreiz-Izel  
Setu embannet ar brezel !!

Lemenig-Veur a zo savet  
Da bilad ar Gall milliget ;

En e zorn a zo<sup>42</sup> eur hleze,  
Eur hleze lemm, brudet ha kreñv :

« Kaledvoulc'h » braz, kleze Arzur,  
Dihouinet gand an Tonkadur.

Hag an Tangwall, kroget bremañ,

---

<sup>42</sup> **a zo : ez eus.**

A zuill<sup>43</sup> Bro-Hall vrein dirakañ.

Ar Hallaoued a zo spontet  
O weled eur Brenn ken brudet :

Sonerien Vreiz, sonet heb neh :  
Ar Vreroned a ya d'an Treh.

Eur youahadenn am-eus klevet :  
Lemenig-Veur en-deus trehet.

---

<sup>43</sup> A zuill : a bulluh.

**Beh d'ar Gallaou<sup>44</sup> !**

Fañch Arabad hag e vignon  
'Oa 'tond euz kêr, deiz eur pardon,

Pa gavjont pevar hrag-aotrou  
Bet o vale war ar mêziou.

Ar re-mañ 'douge livitenn,  
Tok kern uhel war grap o fenn,

Chupenn lost-pik ha bragou-sah  
Ken distumm ha broz eur goz wrah<sup>45</sup>.

O moustachou a oa siret,  
Frizet, troñchet ha pomponet,

---

<sup>44</sup> d'ar Gallaou : ar Franked

<sup>45</sup> eur goz wrah : eru goz gwreg.

Ha 'n o dorn 'doa beb a vaz skañv  
A gasent en-dro 'n eur ganañ.

'Dal' ma weljont on daou baotr mad,  
'N em lakjont raktal d'o goapaad,

Da ganañ 'bouez-penn ar zon skuiz  
Anavezet ken mad gand kêriz :

« Les pommes de terre pour les cochons,  
Les épluchures pour les Bretons. »

« Arabad 'vez, 'me Fañch raktal,  
lezel chas Gallaou da harzal.

Ha d'ober goap euz Bretoned,  
Pa 'mañ mab ma zad war ar bed.

Chom d'am gortoz 'ta aze, Per,  
Ha me 'ya da domma d'o ler. »

Mond 'ra 'trezeg de' goustadig  
Kregi 'ra 'n eru chupenn lost-pik

Hag e sko ken stard gand eun all  
Ken 'h eent en touflez da ruillal.

'N derde, gand eun taol-troad 'n e rer,  
E lamm dreist d'ar hleuz 'barz ar ster.

« Hañ ! 'me Fañch, pevar vastrouilleg,  
Me 'zesko deoh serri ho peg,

Hag e tiskouezo deoh piou e'  
Ar moh diouzim pe c'hwi pe me ».

Ha Fañch neuze o vond d'ar gêr

‘N eur ganañ son ar *Pillaouer*.

## Avel ar mêz

Avel ar mêz a voud ‘uz d’ar gwagou,  
Heñvel ouz alan braz ar mor,  
Hag a leun foueliou gwenn-kann ar bagou  
Troet o staoñ war-zu Arvor,  
Euz an hanternoz, avel ar mêz, dered,  
Krouadur yen temz, deus war da giz,  
Rag bahet eo ar Vro he-deus va maget ;  
Bez va hannad, avel ar frankiz.

Divent meurbed eo da berheniez,  
Heb diwez na mên-harz ebed,  
Hag hep treid nag eskell prim e kerzez  
‘Z an eil penn d’egile d’ar bed :  
N’az talho na kleze dir na lingadou<sup>46</sup>,  
An avi lemm-skilfet n’az traillo,  
Nag an trubarderez, an droug hag ar gaou

---

<sup>46</sup> lingadou : gripedou

Warnout, marheg nerzuz, ne zaillo.

Kalvez ar barr amzer war lez ar mor,  
Gwalarn, torrer an dervennou,  
Te horell ‘n eur youhal mein gleuz an tor<sup>47</sup>,  
Te ‘zav ar mor gwenn he bronnou ;  
Steki ‘rez ar rehell hag int penn oh penn,  
Evel kezeg gouez ha didrehuz,  
A hwirin, a stourm ouzit er vogedenn  
En eur heja o mouezig eonennuz.

Kas a rez dirazout ar houmoul du  
A guz ouzom glander an neñv,  
Evel enebourien a deh bep tu  
Dirag eur gadour braz ha kreñv ;  
Gand an deliou marv, e skubez an êr fall  
Ha, pa dremenez, ‘n on diabarz,  
On skevent en em zispak gand da hwez sall

---

<sup>47</sup> tor : tornaod.

Hag en oabl glaz ar stered vouse'hoarz.

Lar deom, avel ar mêz, beajour diskuiz,  
Lammer dispar dreist kant dorgenn,  
Hag-eñ a zo er bed bro par da Vreiz,  
Hag-eñ a zo unan hepken ?  
Ha gwelet ah-eus tud a vor e neb leh  
'Vel on re, kaloneg ha dispont,  
Pa lamm o bagigou kreiz ar mor gouez leh  
Giz kregin taolet du-mañ du)hont ?

Kerz etrezeg va Bro, sko war an nor,  
War dor ar Breizad 'gouskfe c'hoaz,  
Ha gand da vouez kreñva goulenn digor,  
Galv eñ da stourm evid warhoaz ;  
Dre ar chiminal pe dre doull an alhwez,  
Klemm, hirvoud beteg 'n e wele kloz,  
Lar dezañ e varv a-nebeudou bemdez  
Ar Vreiz 'reas ken kaer he zadou-koz. (*Mouez an Aochou*)

## War zao

Lar din, petra 'reas-te, Breizad,  
E-pad ma youher : « Argad ! ».  
E-pad ma youhe an dud fall :  
« Brezel d'an Iliz ! », e Bro-Hall ?  
Lar din, petra 'reas-te, Breizad,  
E-pad ma youher : « Argad ! ».  
'Vel va Bro-Vreiz, me 'oa atao,  
Sonn ha stard, me 'oa war zao !

Ar roh morse na bleg e benn,  
Morse na bleg an dervenn ;  
E-kreiz kounnar ar gwall-barrad,  
Roh ha dervenn a zalh mad.  
Ar roh morse na bleg e benn,  
Morse na bleg an dervenn,  
Hag evelto me 'vez atao

Sonn mad va fenn ha war zao !

Piou a oar stourm 'vel ar Breizad  
Pa vez deut poent ar stourmad ?  
Ar Breizad na deho biken ;  
Piou 'deh ? An trubard hepken.  
Piou a oar stourm 'vel ar Breizad  
Pa vez deut poent ar stourmad ?  
Eur gwir Breizad a vez atao  
E-kreiz an emgann war zao !

Va dorn krog mad en eur penn-baz,  
Me n'on bet trehet biskoaz ;  
Koaz va Doue war va halon,  
Biskoaz me n'am-eus bet aon.  
Va dorn krog mad en eur penn-baz,  
Me n'on bet trehet biskoaz :  
Jeal ha gwirion, me 'vez atao,  
Eneb ar gaou, me 'vez war zao !

Me 'gar va Bro, me 'gar va Breiz,  
Me 'gar he yez hag he feiz ;  
Ouz an neb 'ray dezi brezel  
Me 'stourmo beteg mervel  
Me 'gar va Bro, me 'gar va Breiz,  
Me 'gar he yez hag he feiz ;  
'Vid he divenn, me 'vez atao,  
Evel va zadou, war-zao !

Pa vezo deut pred ar maro,  
Dispont, dineh, me 'varvo ;  
Bebet am-mo e gwir gristen,  
Mervel a rin heb anken.  
Pa vezo deut pred ar maro,  
Dispont, dineh, me 'varvo,  
O soñjal e vo Breiz atao,  
E vo Breiz bepred war zao !  
(*Mouez an Aochou*)

Moueziou tramor

(Notenn e galleg el leor orin : Pour être chanté sur l'air national gallois-breton : *Hen wlad fy Nhadau* ou *Bro goz ma zadou*.)

N'eh-eus-te klevet o sevel eur vouez kreñv  
Evel mouez eun êl divennour euz an neñv,  
Evel mouez eur hoar o pedi 'vid he c'hoar ?  
Klev !... an hekleo c'hoaz a lavar :

Diskan

Ehanit ho prezel direiz !  
Keid ma lammo kalon 'n he hreiz ;  
Brezoneg 'vo komzet e Breiz.

Deut eo beteg ennom galv braz Breiz-Izel  
O klask mired he yez barnet da vervel,  
Hag o klevet he galv e savom on mouez  
Da houlenn eviti truez.

Ar yez ‘vennit mouga eo yez on Zadou  
Hag on yez ivez, ar gwell euz on madou :  
Breudeur om a ouenn, ni Bretoned Tramor,  
Da Vretoned marhet Arvor.

Hag aon a rafe deoh ar vugaligou  
Evid mired outo komz yez o Zadou,  
Ar yez deut dezo a rumm da rumm dinamm  
A zeskont war barlenn o mamm ?

Evid gwaska Breiz pa zroug he-deus-hi greet ?  
Gand he zae brug, lann ha balan alaouret,  
Na sioul e hune Breiz war lez ar mor glaz,  
Daoust d’he hened, ‘tiñsit ar glaz !

Gand son an delenn, ar Varzed koz gwechall,  
A lake penn-da-benn ar Vro da dridal,  
Hag o han a ree kared da vibien Vreiz  
Kement zo gwir, kaer, leal ha reiz.

Roet ganti frankiz an amzeriou gwechall,  
Na didrouz 'oa Breiz, he dorn e dorn Bro-Hall !  
N'eus mui 'med eur Vamm-Vro, ha 'vid he gwiriou  
Gwad Breiz a red a boulladou.

Breiz 'ro deoh he gwad, 'vel deh hen roi warhoaz ;  
Ouspenn he gwad petra 'houlit outi c'hoaz ?  
Mervel pe beza sklavour hiviziken ?  
Breiz sklavour ! biken, nann biken !

Daoust d'an amzer ha veza rust ha garo,  
Lakit evez, rag Breiz n'eo ket c'hoaz maro  
Na dare da vervel ; 'vid en em zivenn,  
Setu savet ganti he fenn.

Pa grog enno tangwall ar vuanegez,  
Ar Vretoned 'zo spontuz hag hep truez ;  
Diwallit na glefet kreiz youh : Tan ha tir !

Trouz skiltruz ar hlezeier dir.  
(*Mouez an Aochou*)

## **Glahar er barh**

*(Notenn gand Embann an Hirwaz : miret ez eus bet, tamm pe damm, doare-skriva an oberour : Gwenedeg.)*

Gweharall, o ! Barh karet,  
Ha anù er bed oé brudet.

Melkoniuz,  
Taer ha nerhuz,  
Te oé hemb par  
Ar en doar.

Allaz ! hiniù, o ! mem Bro,  
T'hum daol de gousked en-dro !

O ! êh savar !  
O ! peh glahar !  
'Ous é vervel  
Breih-Izel !

Ti ken dihaud, gwearall,

Perag 'plegez-ti ha dal ?  
Ha ti ken peur,  
'Rez-ti ha eur  
D'en estren fall  
A Vro-Gall ?

Ti 'oer, allaz ! a goal più  
E ous gwall draillet hiniù.  
Fall Frañsizion  
Eneberion  
Petag ha chuj  
'Vent distruj.

En Arvor hag en Argoed,  
E fallaad er Vretoned :  
'Rant ket mui 'ne'  
D'on bugale  
Yez na modeu  
O zadeu !

## Nominoe, tad ar vro

D'ar houlz-se on Mamm-Vro, skeduz en he brazder,  
'Helle kemeroud plas e-touez ar broadou all,  
Rag eur rener dispont, karadeg ha leal,  
Anvet Nominoe, he sturie gand preder !

Dre ijen e spered ha nerz e galonder<sup>48</sup>,  
Rei a reas dezi he Frankiz a wechall.  
Pa fiñve beg e viz hepken, Charlez ar Moal,  
A grene gand ar spont en despet d'e Veurder.

Treh eo bet en peb leh d'ar Fransijen divez,  
Hag e-kreiz emgannou spontuz diziwez  
'N-eus lemmet digante meur a vro dudiuz !...

Red eo eta deom-ni, Bretond didrehuz,  
Derhel soñj anezañ, rag, heb e youl, on Breiz

---

<sup>48</sup> e galonder : kalz a galon e-noa.

A oa da Vro-Hall gouez, siwaz, taolet da breiz !

## An amzer ‘hall tremen

Pontkellek ha Montlouis ! Talhouet ha Kouedik !  
Broadelerien valh ! Harozed virvidig !  
Hoh anoiou a zo da viken garanet  
En kalonou ar Vretoned !

Rag n'hellont ket ankouaad ho-peus, ‘pad ho puhe’,  
‘Vid frankiz ho Mamm-Vro, heb arzao, stourmet goue’,  
Na kennebeud ez oh bet ‘vid-se divennet  
Gand ar Gall yud en kêr Naoned,

Gand ar Gall kriz, gand ar Gall sod, gwir den a breiz,  
Entanet a gounnar bewech ma tigor Breiz  
D’an Esper kuñv he daoulagad leun a zaero’

An amzer ‘hall tremen, ouz he heuill ar maro,  
Hep trugarez ! n’eus forz, merzerien veuleuduz !  
E-touez ar Vretoned ho koun ‘zo peurbaduz.

## **Kentoh mervel !**

O ! kanom ar Frankiz, Bretoned taer ha goue' !  
Atap 'vid he diwall, atao bezom war zao !...  
Keit ha ma vo ganim eru hwezadenn vuhe',  
Stourmom oll eviti, kaloneg, heb arzao !

Nag eo spontuz ha kriz, allaz ! beza gwasket !  
Hirvoudi glaharuz en eur skuilla daero'  
Ha gouzañv ouz lagad an treher milliget !...  
Gwell e vije mil gwech, tan-dir ! beza maro !...

'Ha,ta, setu 'deus c'hoant ar Frañsijen hudur  
D'on flega dizale dindan o yeo euzuz !...  
Ha lezel refom ne', broiz kreñv ha nerzuz,

Ober d'o faltazi hervez o flijadur ?...  
Nann ! nann ! kentoh mervel 'n eur enebi oute  
Eged beza sklaved en on Bro goant, eun de' !...

## Yez ar Gelted

Yez a gane gwechall, en goueled al lannou  
Pe dirag ar mor don, Ossian ha Marzin !  
Yez a gan hirio c'hoaz, evuruz ha lirzin,  
Gwynn-Ioan ha Taldir en o hanaouennou,

Setu 'n-eus c'hoant ar Gall d'az mougla en on Breiz !  
Hogen, ar paour-kêz zod ! kaer 'n-eus beza nerzuz,  
Ne deui ket a-benn euz e dorfed euzuz !...  
Kalonou dir ha taer a lamm atao 'n on hreiz !

Ha, n'eo ket evid mann ! prest om hiviziken  
Da skuill on gwad beteg an diweza takenn  
Evidout, mar deo red, o ! yez koz ! o ! yez kaer !

Gelloud 'rez 'ta beza dineh ha dianken,  
Rag, en despet da yez villiget ar gwasker,  
Enoret en on touez, te 'vevo da viken !

## **Youlou ar Vreiziz**

Ar Vreiziz a fell de' gweled o langaj kaer  
Doujet gand an estren, desket d'ar vugale  
'N o skoliou, ha komzet euz eur penn d'egile  
Euz o gourenez ker.

Ar Vreiziz a fell de' miroud krenn o gizioù,  
En em unani stard 'vid bezañ didrehuz,  
Ha gweled o tridal o bannielou luhuz  
War lein ar menezioù.

Ar Vreiziz a fell de' boud gante o-unan,  
Renet gand poell, hervez spered o Gouenn, ha nann  
Evel emaint hirie, 'eneb d'ar skiant-vad.

Ar Vreiziz a fell de', er fi, gweled o Bro,  
'Mesk ar broadou meur, o kemer renk da vad  
Nerzuz 'vel he reier ha sonn 'vel he dro !

## **Breiziz penn-kil ha troad**

Te ‘zoñj dit, Bro-Hall, ez om-ni,  
Breiziz, eur goz ouenn dianket,  
Ez om oll, hirie, gallekaet  
Ha sentuz oh da vestroni !

Ola ! kement-se ‘vad n’eo ket,  
Na ne vezo ! Breiziz feal  
Hag anaoudeg, Breiziz leal  
Hepken ez om, ha nann Franked !

Hag an ene a drid ‘n on hreiz,  
Na drid ket atao ‘med evid Breiz,  
On Mamm-Vro wir, heb eil, unik !

Gouvez mad, eta, o ! Bro-Hall :  
Breiziz a-grenn ‘om ‘vel gwechall ;  
Euz a oueled on halonig !

## **O ! Banniel Breiz !**

O ! banniel benniget ! Arouez digaiilar Breiz !  
Bewech ma sellan ouz da ermenigou flamm,  
Bewech va halonig a wir-Vreizad a lamm  
Gand foughe ha gand stad ha gand dudi em hreiz !

Pa strakez en avel, me 'gred eo va Mamm-Vro  
A glevan o hervel he mibien hirvouduz  
D'en em unani stard 'vid bezañ gallouduz  
Hag heb aon dirag nerz ar Frañsijen haro !

Heh ene 'n ez plegou a zaskren, birvidig.  
Ar Vreiziz a dle 'ta, en-dro dit, 'n em strollañ,  
Heb gortoz tamm ebed hag hep troidellañ,

Ma fell de' kaoud eur Vro nerzuz ha pinvidig  
En amzer-da-zoned, beo-buhezeg 'vel gwechall,  
Ha dieubet a-grenn euz domani Bro-Hall.

## **Kan brezel**

War zao, Breiziz kernv ha feal !

Ti hou hou hou hou !...

Mar fell dim beva dishual !

Ti hou hou hou hou !...

Labourerien ha tud desket,

A-walh 'vel-se on-deus kousket,

On gouenn dinamm a zo gwasket !

Pell euz on hreiz ar velkoni !

Deut eo an eur evidom-ni,

Deut eo an eur da zihuni !

Noz-deiz, siwaz ! on Mammi-Vro

War he dismantrou 'skuill dareo'

Hag en eur hortoz ar maro !

Trist eo on stad !.... N'esu forz ! Bro-Hall  
Ne ehan ket d'on disfeal,  
Ha d'on moustra gwas ma hall !

Ar Brezoneg, on paour-kêz yez,  
A zo argaset hep paouez  
Gand he skolaerien didruez !

Pez a garom 'deus kaillaret  
Hag on Frankiziu ken karet  
A zo bet ganti douaret !

Kasoni 'n-deus ouz on giziu !  
Ha, daoust da gounnar on moueziu,  
E kresk c'hoaz he c'hoantegeziou !

Poent braz eo deom sevel on fenn  
Ha 'n em voda evid divenn  
Herez on Tadou !... Torr e benn !

War zao, Breiziz kernv ha feal !

Ti hou hou hou hou !...

Marfell dim beza dishual !

Ti hou hou hou hou !

## Da Vro-Hall

*« Eun deiz e teuio leh e vo gwelet ar broiou gwasket o sevel o fenn hag o lakad o mestrou digar da grena gand ar spont ! »*

*Henrik Sienkiewicz, Pomoniad.*

**Notenn gand “Embann an Hirwaz”** : *Ar re a zoñjfe en eun doare all a vefe tud fall, diouz soñj an oberour..*

Bro an oll dorfejou<sup>49</sup>

‘Vid perag ‘n-eus or Breiz hoh anavezet, allaz !

Gwechall, ‘raog ma kollas,

Dre valhder eun Dukezig foll, he droejou,

Dineh hi a gane

Hag eur vraz a eurvad ‘n he halon a rene !

Neuze ar Vretoned,

War lein o menezioù goloet a reier

Pe ‘kreiz o hoajeier,

---

<sup>49</sup> Bro an oll dorfejou : **Notenn gand Embann an Hirwaz** : Mond a ra re bell Le Rumeur.

‘Vid he divenn, raktal, ‘n em gavet unanet  
Hag o mibien direiz,  
O ! Bro-Hall, a dehe gand ar spont en o hreiz.

Mez se ne bado ket  
Rag ennom a zo c’hoaz bugale galoneg,  
Didrehuz ha penneg !  
Hag en on halonou, a gasoni karget,  
Tan ar vuanegez  
A verv ! Krenet eta rag on zavedigez !

Kaer ho-peus beza kreñv,  
N’eus forz ! Bro-Hall daonet ! n’eus forz ! on mammig Breiz  
N’ho-pezo ket da breiz !  
Kroget ma dom ‘n he stur ! ha ‘raog pell adarre,  
‘Raog pell ‘vo dishual  
Ha nerzuz, ni hen tou ! evel e oa gwechall !

## **Pa vin maro**

Pa vin maro, c'hwi a deuio, ma mignoned,  
D'eur zul, d'an abardaez, goude ar gousperou,  
Tost d'an iliz vihan, e kornig ar vered,  
War ma bez ken dister e-touez an oll veziou.

X'hwi a zegaso din bleuniou koant ar mene' ;  
Lann melen, brugou glaz hag ar balan dispar,  
Ha, da skeudenn buhez peurbaduz ma ene,  
E lakfet en o zouez eur bodig uhelvarr.

C'hwi a lavaro din ha Barzed 'zo dalhmad  
O kanañ ar Frankiz, an tan sakr en o hreiz,  
C'hwi a lavaro din (o ! pebez kelou mad !)  
Ha trehet eo d'ar fin ar Gall, enebour Breiz.

Neuze, mignoned ker, e trido ma halon  
E goueled ar bez du, dreist planken an arched,

Ha, keid ma vo douget a-dreuz d'an neñvou don,  
Gand eur barr-levenez e trido ma spered.  
*(1913)*

## **Boéh er gwir Vretoned**

Bretoned, saùam ur penneu,  
El gweharall ar en dachenn,  
Aveid diskoein d'en ol bobleu  
Ema hoah lan a nerh un gouenn.

Hiniù, ur gwed ru' e rid en ur huehiad ;  
Un divreh e zo houarn ; un haloneu 'zo dir.  
Sonn 'oam ar un diùharr, ar un treid ni zalh mad,  
El er roh er garreg, el, en douar, ar mênhir...

El un tadeu karet, e oem dispont ha ter ;  
Dirag 'z em kement tra e bleg fonnabl o fenn,  
Pa daolam e kounnar, en êr hag en amzer :  
« Malloh ! a-raog ! a-raog ! diskaram de' o fenn !. »

Petra zo kaoz Feiz santel hag er soñj ag un tud ?  
Hiniù hoah el a-gent e oem fur ha kreduz :

Dalhmad er lealded, e Breih, en-devoa brud.

Gweharall, un tadeu en-deus um zihoédet  
Aveid dihuenn er Mad pe evid gouarn o Frankiz ;  
El de', ni vrezeley evid ar Groaz venniget  
Hag aveid ur Mamm-Vro, kenteh ùa vo rekiz.

Bretoned, saùam ur penneu,  
El gweharal ar en dachenn.  
Aveid diskoein d'an oll bobleu  
Ema hoah lan a nerh un gouenn.

## Nevenoe

Abaoe pevar-hant vloaz, Breiz-Vihan 'oa flastret ;  
Dindan treid ar ouezidi e chomas pell moustret,  
Dindan yeo ar Romaned ha tud an Hanter-Noz,  
Siwaz ! izel e plegas pennou on tadou-koz.

Re a zizunvaniez a rene dre Vro-Vreiz,  
Ha bagadou an estren a zaille war o freiz.  
Soñjom piz, brogarourien, ha tennom ar gentel :  
En em vodom, mar klaskom an treh da Vreiz-Izel.

Meur a Vreizad a glaskas gwalla an enebour ;  
Med, bepred dizunanet, e oant berr a zikour ;  
Ha Jarnithin, ha Morvan, al Lez-Breiz ken brudet,  
Ha Gwyovac'h e-unan, heb eil a oa pladet.

Doue !... Daoust an Arvorig a zo o vond da goll ?  
Daiust hag e vo dispennet gand skilf ar Frank diroll ?...

O ! nann, Breiz a lugerno pell amzer er bed oll,  
Rag Nevenoe dispar a zavo en eun taol.

Breh nerzuz, spered digor, e lako e halloud  
Da viroud ouz an Ankou da zond da skei e vroud  
E kig e ouenn dinerzet : da Nevenoe eo  
E tle c'hoaz ar Vretoned da veza eur bobl veo.

Gand izili diframmet, e sav eur horv a-bez,  
Hag e ijini brogarour a hwez ennañ buhez.  
Deut eo an Neveboe ; hag ar Breton a vrall  
Soudarded an Normaned hag an Impalaer gall !

-« Charlez Veur, da lezennou buan a zo torret,  
Oll hualou Breiz-Vihan e berr a zo trohet :  
Breiziz a zo dasorhet, pilet ar Hallaoued...  
Enor d'an Nevenoe a vrevas ar haoued<sup>50</sup> !

---

<sup>50</sup> ar haoued : ar re widreüz.

-Douarou a-dro Redon, daoust ha c'hoaz ho-peus soñj  
Ped mil a enebourien a bakas dit 'n o groñj ?  
Daoust ha n'ho-peus ken eñvor, pegen mezeg ha stank  
A dehe, rim, soudarded Charlez ar Penn-Moal frank ?

-Ha c'hwi, lanneier Ballon, daoust hag e-pad tri deiz  
N'oh ket bet a-walh douret gand gourinerien Vreiz ?  
Dindan ho yeot, a-dammou, leun a doullou goafou,  
Ped mil euz or gwallerien a vreinas o horvou ?

Dindan tud Nevenoe, penngollet gand ar spont,  
Ar Franked a oa flastret : an teh prim a glaskjont ;  
Hag ar henta p terhel, tre beteg kêr Bariz,  
E oa Charlez ar Penn-Moal, kannet gand ar Vreiziz.

Ar peoh a deu d'en em skign : Nevenoe 'zo treh ;  
Harzou Breiz 'zo diwallet gand nerz dispar e vreh,  
Ha korv rouantelez a-zindan e skoazell  
Buan e sav d'ar vuhez goude laz ar brezel.

Ar Brezoneg a glever a bep tu o tiston  
Tre diouz pellder Beg-ar-Raz beteg douar Redon :  
Nevenoe a oar mad n'eo nemed der ar yez  
E heller derhel buhez en eur vroadelez.

Gand sikour Sant Konvoion, sikour e vanati,  
E teu an Nevenoe a-benn da Vreizadi ;  
Ar veneh, an eskibien, Gallaoued 'gozig oll :  
Ar Vreiziz o-deus bremañ o Arheskob e Dol.

Kpnvoion, Nevenoe, ar zant, ar brezelour,  
O-daou e kasont da vad an heveleb labour :  
Gand ar Groaz hag ar Helze emaint o stourm bemdez  
Beteg ma'z eont da hourvez o-daou er memez bez.

« Breiziz an amzer-vremañ, taolom a-dreuz eur zell,  
N'ankounahaom ket or gloar, daoust m'emañ hizio pell ;  
Ma lufra, dalhaom eñvor, or Breiz, eun deiz a oe,

Eo ma harpet neuze war breh Nevenoe !

Dalhom soñj piou a drohas da Vreiz he hualou !

Ra vo meulet e ano e-doug ar hantvedou !

Eur youh war or muzellou ra bigno diouz or hreiz :

« Enor d'an Nevenoe, Tad Broadelez Breiz ! »

## Er glaù

En amzer gouh a huéharall,  
Pe gouehe glaù ar ur bro-ni,  
E de voud fréhuz en douar,  
‘Vleué er park, eùe er bar  
E oé melen éd en éruí !

Rag én amzér ‘m-es ké déhi,  
En amzér gouh a huéharall,  
On tud e oé mestr en o zi,  
Tud digabestr ha tud léal !

Hiniù en dé, en treu ‘ya fall :  
Spontet, ni ‘gleu savar er glaù,  
Glaù milliget er modeu gall,  
Deit a vêz-bro er modeu fall,  
D’on diskarein, hag hemb arsaù !

Rag en amzér bremen ‘zo kri’ ;  
Hiniù en dé, en treu ‘ya fall ;  
Ur Breihad mad ‘n ez melkoni,  
Pe uhel é vro, soubet hé zal.

Ur Bobl el Breih n’hel ket boud gall !  
E ma halon ur vouéh e lar :  
« Gwarnet berpet en esperañs !  
D’emb é vo hoah eun dé on douar !  
Né veim ket fêhet ged ré Frañs !

Rag én amzér e tey un dé  
Er Vretoned ne veint ket gall,  
Diliamm e vo or Bro arré  
Ha treh or gouenn el guéharall ! »

## Salud da Verzerien Vreiz

O ! Breiz, douar Arvor ! Salud, douar kelteg,  
Bouchet gand gwagennou ar mor dichadennet !  
Salud deoh, soudarded, stourmerien galoneg,  
Dindan an dero braz ha korvou douaret !

Gras deoh, en pep tachenn, on enor 'zo salvet !  
Brudet ar Vretoned evid eur ouenn nerzuz !  
Kousket 'ta, tud dispar, en istor enoret,  
Vreiziz 'zalho ouzoh eur soñj peurbaduz !

Rag c'hwi, gwir Vretoned euz ar fiziañs santel,  
'Vid saovetaad gwerhded 'n Erminig oh maro,  
'N ho tremenvan 'lareh : « Buhez da Vreiz-Izel ! »  
Kousket eta en peoh, rag meulet oh tro-dro.

Nann ! n'hellez ket mervel ; nann, n'hellez ket diskenn,  
Breiz-Izel, douar sakr an dero kantvedeg,

Rag, evel an heol aour a darz penn ar goabrenn,  
Adsavet out hirio, lirzin ha karanteg !

## Salud da Vreiz-Izel

Salud, dit-te, o ! ma Bro-Vreiz,  
Bro 'n dud a galon hag a Feiz ;  
Ennout 'veve bemdez er sioulder  
Da vignon mad al Labourer.

Pegen laouen 'vez ma halon  
Pa hellan dit kana eur zon,  
Eur zonig ken brao ha lirzin,  
Goude 'ven savet, beb mintin.

Nag aliez 'deus va zelegg  
Sonet gwerziou trist pe laouen ;  
Gwerziou trist en enor d'ar Vro,  
Soniu laouen d'an eureujo'.

kana 'rin c'hoaz a-bouez va fenn,  
Etre va bizied va zelegg,

Euz va Bro-Vreiz ar meuleudiou,  
Ma 'yelo 'n hekleo en Neñvou

'N eur Vro gaer ez on bet ganet,  
En-dro din lannou alaouret :  
Pegen dosu ma havell n'oa ket,  
Gand an daou vor glaz luskellet !

En eul leh didrouz, va-unan,  
Gourvezet, hag en-dro din lann,  
O ! aliez 'santan em hreiz  
Eur garantez vraz evid Breiz.

Ha pa ven gwintet em hambrig  
Uhel, uhel 'vel eun neiz pik,  
'Red va spered d'am Breiz-Izel  
A-uz d'ar hoabrennou uhel.

Nag e karan ar Brezoneg,

Yez ar Vretoned karanteg :  
Eul lañgach kaer, mar zo unan,  
'Da gand ma halon p'e glevan.

En despet d'an oll Hallaoued,  
D'o hiziou fall ha milliget,  
Ne varvo ket yez an Tadou  
War ar mêz na barz ar hêriou.

Mar deu beh warnout Breiz-Izel,  
Dit ni roio oll or skoazell,  
'Vid herzel na vo labezet  
Kaerder Broig ar Vretoned !

## Galvedigez

Ma zelennig, kan 'ta, sklinton,  
Kan di kanaouennou gwechall,  
Euz an noz hag euz ar mintin ;  
Kan an doujañs 'vdi an Ermin,  
Rag an amzer 'zo arru fall.

C'hwi, korednn aour, gand ho mouez sklêr,  
Kanet Doue 'barz an neñvo',  
Doeu 'zo leun a zouster ;  
Kanet Mari ; Gwerhez tener,  
Ma vo sikouret on Mamm-Vro.

Kordenn arhant, dihunet Breiz,  
Rag argaset eo gand ar Gall :  
Distonet, ma vo Breiziz reiz  
Da zivenn o Bro hag o Feiz  
Ma voint digabestr 'vel gwechall.

Ar brezoneg, yez on zado'  
Kordenn dir, ganeoh-hu kanet,  
Ar brezoneg kreñv a chomo,  
Karet a-greiz on halono',  
Beteg ar maro divennet.

## **Dihunam !**

Hiniù, duchentil a Vro-Hall  
E hoarh doh un guskumanteu,  
Hag, aliez ! mar a Vreihad dall  
E goll ar penn ged o helenn  
Hag e daol chupenn e dadeu.

En Anken, digor e askell,  
E glah en tu de skoein arnam :  
'Ma er gizieu koh e vervel...  
Dihunam, paotred, dihunam !

Hiniù, duchentil a Vro-Hall  
Un flastr ged o lezenneu kri' ;  
Gwerhet o haloneu d'er Fall,  
Int e gas en treu kaer mem-ni  
Hag eneb de' ne saù hni.

En Ankeu, digor e askell,  
E glah en tu da skoein arnam :  
'Ma er Frankizieu e vervel...  
Dihunam, paotred, dihunam !

Hiniù, duchentil a Vro-Hall  
Get ur horvad arfleu e lar :  
« Komz e Galleg el er re 'rall ! »  
Ha kavouid e reer tadeu e vervel...  
Dihunam, paotred, dihunam !

Hiniù, duchentil a Vro-Hall  
En on hevelenneu<sup>51</sup> e skriù : »

Ha lod, doh o hleved, e viù  
N'en-deus na Doue, na bed arall ! »  
Hemb pedein Doue, el loned gouiù !

---

<sup>51</sup> hevelenneu : helaouennou.

En Ankeu, digor e askell,  
E glah en tu de skoein arnam :  
'Ma er Fe' kristen e vervel...  
Dihunam, paotred, dihunam !

Hinim, duchentil a Vro-Hall  
E venn gwaskein oll en treu-se,  
A-goust m'o-deuz groeit gweharall,  
Inour Breih hag he nerh eüe :  
Na hi e bleg penn dirage !...

En Ankeu, digor e askell,  
E glah en tu dae skoein arnam :  
'Ma un Mamm-Vroig e vervel...  
Dihunam, paotred, dihunam !.

## Huñeer

Deja en hiol e zo oeit de guhed en dan,  
En noz a zo koehet ar er mêzeu didrouz ;  
El loer hag er stired e splann en neañ ledan  
Hag er mor, en aodeu, e lar e soneu dous.

Pep tra e ya de hun. Me neoah, me-unan,  
El un enean e poen e vale d'ar er-mêz,  
Me 'gerh diragon, ne ouian mem eh an,  
Mez me halon e vleù, rag choñjeu kuñv em-eus !

Ennis e choñjan hoah, Bro divlamm me Zadeu,  
Breih venniget, o ! Mamm santel ha ken karet !  
Ennis eh uñean , ar saù ar en aodeu :  
Dit me halon bremen, ha dit e vo bepred !

O ! me ha kar, Bro kriù ha tiner etrezoll,  
A behani en tal adrest d'oll e lugern !

Er gwed 'red e men gohiad e zo e jol :  
Me zo e vab, o ! Mamm, beteg mel e eskern !

M'her gouer, en ur prantad bez zo mar a unan  
Hag e lar : « Doue, er Vro, en-deus groeit o amzer !  
« Treu int de voud konteit d'er vugale vihan  
Ha pas dem-ni. Evidom tremenet e' o êr ! »

Sonn e' me hredenue ; en tal saùet d'en Ne',  
Hemb cheleu o homzeu amoed, me bas me hent ;  
Ha me ha kar, mem Bro, ged oll nerh me ene :  
Me ha kar, me ha kar !... Doue ouer pegement !

Doue ! Eañ eùe ha kar, rag ar ha touar santel  
E zoug er bobl galùet dre en Itron garet  
Gouenn hlan er Vretoned z viù z Breih-Izel  
En ur hortoz en de de lar'd he ger d'er Bed.

Peher e tey enta de' er Gelted, o ! Doue ?

Peher e lugerno arnam heol er Frankiz ?  
Eneb d'er Fall, el gueharall Nominoe,  
Più 'ta e anbrugo d'en treh er yaouankiz ?

O ! de, de benniget, luh ar un Bro ! Chetu  
Pemp-kant vle hag open e hortom ha sklêrder !  
Allaz ! netra n'ez a... En dremmwel e zo du  
Hag er Fe e hochel<sup>52</sup> e kalon er vreder !...

-Mez arsaù, ma zelenn,hag hirvoudein ket huerù :  
Imberr e tegoueho un eur eùe, imberr !  
Deja ar gran hadet e zivroud ar en erù,  
Hag ur voeh d'em diskouarn e lar goustad : Esper !

Esper !... ya ! Er Sent koh, er Varhed, er Rouane  
Aveidom dirag Doue e lavar o fedenn ;  
Un adsau e zo kriù p'en-deus he harp en Ne !...  
Rag se em-eus fiañs Breih, en ha blanedenn.

---

<sup>52</sup> e hochel : e tigrask.

## Breiz Dishual

**Notenn e galleg el leor orin** : Ce genre a été mis en musique par le compositeur natais Job Loyant, membre du Comité de rédaction de *Breiz Dishual*.

Setu abaoe pevar-hant vloaz  
Breiziz kaled  
‘Zo hualet,  
Hag ar Gall, kasaet a-viskoaz  
A vah on Bro  
Bete ‘r maro.

Gouzañv a ra on Broad paour  
Glahar euzuz,  
Poaniou mezuz,  
Ha, trehet gand an enebour,  
‘Halv ar brezel  
Prim d’he skoazell.

Ar vor, Erin ha Bro-Gymru,  
Skos, Kerne, Man  
War zav bremañ !

Ermin, Telenn aour. Dragon ru',  
War zav, o ! ya,  
Oll Geltia !

'N em unanom evid divenn  
Ouz Gall ha Saoz  
On Broiou koz,  
Ha savom d'an neh, 'uz d'on fenn,  
Ar banniel ker  
Harz ar gwasker.

Siwaz, an estren a Vro-Hall  
A wad eur preiz  
Gloazet 'n e greiz...  
Peleh emañ 'n amzer gwechall

P'edom, heb mestr,  
Oll digabestr !

A-raog 'ta, breudeur, pa'z eo red !  
Haro d'ar bleiz  
A dag on Breiz !

A-raog, evid ar Vro garet  
'Viti hepken  
Da virviken !

-Setu da vibien, kousket c'hoaz,  
Eont da zevel,  
'Vel an avel :  
Salud dit-te. Breiz a-warhoaz,  
O ! Breiz feal,  
Breiz dishual !

*(Miz Even 1912)*

## Hun ar barz

Skuiz e gorb, skuiz e benn, ar Barz a zo kousket.  
Dispignet ‘n-eus e nerz hag e oll voiziegez<sup>53</sup> ;  
Taolet ‘n-eus da Vreiziz eur galv leun a furnez  
‘Vid adsevel o Bro, gand an estren gwasket.

Kousket eo, roufennet e dal gand melkoni ;  
E zorn e sav evel da vallozi eun dra.  
Mez, eur pennad goude, gwag ha losk, koueza ‘ra,  
Evel hini eun den prest da falgaloni.

Daoust hag-eñ ‘kav ar Barz eo re ziêz derhel  
Ar pezh en-deus touet eun deiz d’e genvreudeur ?  
Daoust hag-eñ ‘wel e Vro peurgouestlet d’ar gwalleur ?...

Nann ! Souden ‘n e huñvre e tarz ‘barz an dermmwel  
Eur ger, ar ger *Esper*, o lugerni dre-oll,

---

<sup>53</sup> voiziegez : skiant.

E lizerennou-tan, war Breiz o vond da goll !

## Ar vuhez o honid

- E koun an 20 a Vezeven 845

Ugent a Vezeven, deiz meurbed dellezeg  
Da veza garanet e pep kalon vreizeg,  
Te a zalh, en Istor, eñvor euz eur brezel  
En em gavas gwechall 'tre Gall ha Breiz-Izel.

E manati Ballon e oe an abadenn...  
Divreh ar Vretoned a oe nerzet souden  
Gand ar has a zalhent ouz o enebourien...  
E kalon pep Breizad, hi 'zo c'hoaz e gwrizienn.

Ar Roue Nevenoe 'oa e penn ar Vreiziz,  
Hag a roe der skwer d'e dud kalon iskiz.

- éDalhit stard war ar Gall ! Pell amzer or moustras ! »
- Or broiz 'ententas : o gonid a oe braz !

Ar hann istorieg-se, hirio ‘zo adkroget,  
En eun doare nevez, goude unneg kantved,  
Etre an orin hall hag an hini vreizad :  
Ar vuhez, ar maro eo ‘zo gand ar hrogad.

Gouenn veo ar Vreiziz a zo gonid bemdez  
War hini ‘r Hallaoued a nah rei ken buhez.  
Tiegeziou niveruz bremañ a zo faezet  
O senti da urziou a-berz Parizianed.

An tonkad a zo sklêr : an niver ‘dle flastra  
Ar hevredad skuizet a ya war zisterra  
Dirag se bro ar Frañs, he-deus, dre lezennou,  
Savet ren an niver, a jom glaz he genou.

Goude pevar-hant vloaz a stagidigez red,  
Ar gounnar, er galon, bet pell-amzer miret.  
Evel poultr a strako. Drellet e zaoulagad,  
Ar Breizad, gand ruster, ‘yelo d’an divroad.

An diviz a vo berr : « Breizad on ! Te ‘zo Gall !  
Da dud, ‘pad kentvejou, euz va re ‘zo bet fall.  
Bremañ, kerz da jeda ! Anez ar ouenn a gresk  
A vruzunfe da vad an hini ‘ya da hesk. »

Ar Gall ‘gomzo a-feur gand on hentud sinet.  
-« Yeo lakaet gand an nerz, hirio ez out torret !  
E-doug an oll amzer, Gall<sup>∞</sup> te ‘oa o vresa  
Dleadou euz ar feur ‘gaven an diêsa.

Hirio, da ren echu, d’an douar e pladi !  
Kouer, koulz ha Roue, a zo mestr en e di !...  
-« O ! pebez neventi ! E Breiz, gouel a vo !  
Da gemer lod er joa, on Tadou advevo !

Hag an hekleo goaper

‘Guzo tregern or han

Beteg on eneber

A zo ‘n e dremenvan ! » (*D’an 20 a Vezeven 1912*)

## **Dihun ar Vretoned**

Na van ket deuz a Vreiz, kevell, ‘med an ano :  
Ar gwad a ree tud kreñv on oll zadou koz,  
An nerz o ree kadarn dilez on halonou ;  
Ar ouenn geltieg a zo maro henoz.

r Breizad a-vremañ ‘zo judev pe gallo,  
Alamant pe treitour, ê Saoz, me ‘oar petra ?  
Bretoned Konomor ‘zo maro pell a zo,  
Deskibien Pontkalleg ne reont ken netra.

Arhant ar Hallaoued ‘n-eus prenet hoh ene  
Ha lakaet ho tivreh dindan e chadennoù.  
Ho tismantra a rey hag ho mouga goude  
Heb na êsao den frika e grabanou.

Distaolet ho telenn, Barzed a Vreiz-Izel,  
Deredet da gousked adaleg an deiz-mañ ;  
Ar Gall ho tihuna pa vo en krog-brezel,  
Pa vo ezomm diouzoh da vervel evitañ.

Na zavet ken uhel nag ho toenn, nag ho mouez  
Da houlenñ bara-lêz, na dour, na librente' ;  
'Pesu kalon a-walh da vevañ en on zouez  
E-giz yud duhual, kreñv ha libr da vale.

\*

-Pont kalleg ha Merkœeur, daoust ha c'hwi na veh ken ?  
Daoust ha maro a ve hoh ene hag ho kir<sup>54</sup> ?  
Daoust hag ar spered gall en on mesk-ni a ren ?  
Maro ma Bro ? Feiz d'am Doue ! se n'eo ket gwir.

En kalon eur Breizad tener, gwag ha klouar,  
N'eus ken a spered-vro nag ene keltieg ;

---

<sup>54</sup> kir : ker (evid ar rim).

Gand Gweklin ha re all, er foñs don an douar,  
Ar galon wag ‘zo eet gand hoh eskern breineg.  
Med en kalon tud yah, tud kreñv ha tud kadarn,  
En on halonou-ni, Bretoned yaouank-flamm,  
A zo gwad rik a-walh, Gallaoued, ‘vid ho parn  
Hag a-walh ‘vid beuzi enebourien on Mamm.

Keit ha ‘vo mein ‘n he hreiz hag ar mor en he zro,  
Ni ‘vo nerzuz ha kreñv evdi beva ganti,  
Ni ‘vo nerzuz a-walh evid divenn on Bro,  
Ha meurbed karanteg ‘vid mervel eviti.

Ha bremañ, pa zo meur a Vreizad morgousket,  
Troet gand aour, ha gand merhed, ha gand traou all,  
Ni na houlfom ket ken bezañ hirroh gwasket  
Hag e touom hirie d’on zro laha ar Gall.

Ni na houlfom ket ken bezañ mevelien Frañs,  
Med, evel ‘Pontkalleg, bezañ tud dishual,

Bezañ digabestret, ha c'hwi ivez 'michañs,  
'Med ganet e vefeh dimeuz ar ouenn all.  
Ha, kousto pe gousto, ni 'vo digabestret,  
Gallaoued ganeoh-hu, peotramant ganim-ni,  
Rag ma plij ket ganeoh 'vefem dishualet  
Ni 'n em dishualo dre nerz on hasoni.

\*

Nann ! n'om ket Frañsizien ; ni a zo Bretoned !  
Breiz 'fell dim beva, Breiziz 'fell dim mervel,  
Ha mervel a refom, dishual, pa vo red,  
'Vid enor on Gouenn hag on Bro Breiz-Izel.  
(1912)

**O ! Breiz-Izel, O ! Mamm zantel**

*(Kinniget da vugale : Breuriez ar Brezoneg.)*

O ! Breiz-Izel, o ! Mamm santel,

Bro garet on zud-koz,

Evid Doue, 'skeud ho pannel,

Ni 'gerzo, dezi ha noz ;

Unanet 'n on Breuriez,

Ni 'gano a-bouez-penn :

Bevet ar gwir unvaniez

Ha Breiz da virviken !

On diouvreh a zo c'hoaz dinerz

Da stourm evid on Breiz ;

Mez he harantez a zo serz

Ha birvidig 'n on hreiz ;

Hag eun deiz, mibien dister

Breuriez ar Brezoneg

A rey d'Arvor soudarded taer

Ha Barzed kaloneg.

Spered Bro-Hall, he gwall-skweriou,  
‘Vel eur barr-avel foll,  
A drubuill peuh on halonou,  
A glask on has da goll ;  
Daoust d’an avel ha d’ar bed,  
Ni ‘gerzo ‘vid ar Gwir,  
War on diskoaz pennou kaled,  
‘N on hreiz kalonou dir.

On galvedigez ‘zo uhel,  
Dispar eo on mennoz :  
Miret gwerh an herez santel  
A hadas on Zent koz ;  
On youl a vo didrehuz,

Ha taer mouez on zelenn  
Erminig Breiz ha Kroaz Jezuz  
On reno da viken.  
*(Mouez Menezh Kerne).*

## **Enor da Vreiz !**

Enor d'on douar santel,  
Levenez on halonou !  
Enor d'on Bro divarvel,  
Enor da Vro on zadou !

Enor d'ar wir Vretoned  
'Zo marvet evidom-ni !  
Deg ouz kant o-deus stourmet  
Heb nepred fallgaloni.

Mil bennoz d'on Roue meur  
Nominoe an trehour !  
Gloar da Bontkalleg, Merkœur !  
Malloz d'ar Gwesklin treitour !

Setu bremañ Breiziz vad  
O klask terri ar chadenn

Heuillom int en eur bagad  
Ha Breiz 'vo treh da viken.